

Breman 8, ru HOCHE 35000 ROAZON

20 Iur


bremañ

EVEN-GOUERE 1988 Niv. 81/82

3 BLOAZ EVIT SEVEL SKOLAJ DIWAN



ROPARZ HEMON



LIZHIRI

Da vodad skridaosañ Bremañ-

Setu ma chekem adkoumantañ, evit ar wezh diwezhañ marteze. Tremen skizh an aot gant spred ar gazetenn. Re ur tuiek en holl eo. Embann a rit ez eo "Bremañ" gazetenn ar stourmou e Breizh. Ned eo ket nemet da'n men, nemet re sell-fec'h ket ouz ar stourmou ro-net war tachenn ar vroadelouriezh evel gvir stourmou... Se a sell ouzoc'h, a-benn ar fin. Met embannit kement-mañ fraezh na vo gouezet pelloc'h petra eo Bremañ.

A-hend-all eo divalav a-walc'h Brezhoneg ar gazetenn. Strivit un tamm bennak d'ober gant ur yezh kompenn, n'eo ket ul lazh adlema ar pennadoù...

Mar kendalc'h an traoù gant un hent-se ho po ar blijadur, pe an displejadur (diuz deoc'h) da lemel un anv war roll ho kounanterien.

Martial Menard (Kemper)

Ennao o paouez lenn e Levr Peter Berresford Ellis : "The Celtic Revolution", embannet gant "Y Lolfa" e 1985 : er bajenn 85, e-barzh ur pennad gouezetlet d'ar Geltaed dre ar bed (en Amerika dreist-holl), em eus lennet kement-mañ (buan ha buan e traoù diouzh ar saozneg) : "N'eus nemet rannvro ar C'hebeg e Bro-Ganada (ken itik m'eo evit miroù o gwirioù d'ar c'hallegerien) na fell ket dezhi niveriñ pet den a zo o komz Brezhoneg, Iverzhoneg, pe Gouezeleg (Bro-Skos) war he zachenenn (hag int niverus koulskoude !)" Evel ma welit eo ken gvaaz ar c'hallegerien war bep tu ar Meurvor Atlantel !

Bernez Kadared (Montgeron)

Meur a c'houlenn am eus da ober ouz Alan Ar BERR en deus skrivet ar pennad "ye-c'hed" diwar-benn ar berrnial war niverenn 78 Bremañ, rak daou vab am eus, o c'housañ o daou prantadoù berrnial.

War hañval ez eus meur a seurt berrnial : daoust ha bre-c'hidigezh berrnial a zo mat evit an holl seurtioù ?

Daoust hag ez eus un ar-var bennak o tont diwar implij al louzoù-se ?

Daoust hag ez eus tu d'an Ao. Ar Berr kement din-en un doare prevez na n'eus ket tu hen ober er gelaouenn- ar ha chomlec'h ur meseg e Breizh oc'h ober gant al louzoù-se ?

Trugarez bras.

Itron Baudet (Perroz-Gireg) 18, bd du Sémaphore - 22700-

Ne oa ket trawalc'h evidoc'h ober goap ouz ar re a glask "gant o fetisionoù" reiñ un testeni eus youl Pobl Vreizh e-keñver he Yezh, un tamm labour ha n'eo ket bet fellet deoc'h kemer perzh emañ : war zigarez boueta ho rajennad a daolioù pluenn, sot awalc'h oc'h bet evit kemer evel gvirionez toust flemmadenn ar gelaouenn Emgann ouzthin.

Ne yan ket da adskrivañ evidoc'h e brezhoneg an dislavarenn a gasan da Emgann. Setu adskrivadenn ar Lishar. Deoc'h d'he implij na fat deoc'h e soñjfen -ha meur a hini all gann- ez oc'h tud leal.

Armand Keravel (Brest)

A-bep seurt tud a zo bet o skrivañ en "Taolioù Pluenn" ha flemmadennoù displejus a vez gwech ha gwech all. Respontoù a zegasont ha reizh eo. N'eus nemet aozer ar pennad a vez ep gouestlet e seurt pennadoù avat ha ne c'hell ket ar gelaouenn bezañ lakaet kiriek diouzh ar flemmadennou-se.

Embann a reer ar pennadoù a resever peurluviañ ha poan a vez o leuniañ ar gelaouenn gant danvez dudius alies. Ur fazi bras hon eus graet en niverenn diwezhañ avat, en ur embann ur pennad Taolioù Pluenn na oa ket bet sinet gant anv an aozer. Reizh eo en defe neb a ra hevelep tagadennou ar galon da sinnañ ar pezh a skriv, a-hent-all ne dalv ket ar boan bezañ embannet.

Ur pezh labour en deus bet graet Armand Keravel hag e gamaraded o tustum an 50.000 sinatour evit goullenn un danvez lezenn evit ar brezhoneg. Lavoen e vefemp zoken ma kasfe deomp gwech ha gwech all ur pennadig o reiñ keleier eus ar stourmadenn-mañ evel m'en deus bet graet gant kazetennou all.

BREMAÑ

Dipitet on bet un disterañ o lenn war niverenn diwezhañ Bremañ, burutelladenn Yann Penn-haleg war romant Mikael Madeg "o Breizh, wa Bro" gvir eo kentoc'h meuleudi e kan d'al levr met war un ton drol a-walc'h en deus va lakaet diaes un tamm. N'eo ket ur bennoberezh, emesañ... ha neuze... n'ouzon ket re vat, da lavaret gvir, petra eo ur bennoberezh. Levrioù 'zo a vez santet emma buhez hag ul lodenn eus ar wirionez a zo pal al lennegezh degas deomp d'ar menno. Evidon romant Madeg a zo unan anezho ha ne gavan ket reizh e vefe kimiget e-giz un tator polit kontet mat, tra ken.

Evit ar wech kentañ em eus lennet ase, hag adlennet, un destenn o taolennañ ar vro m'emañ o chom emni mui pe vui evel ma santan emañ hi. Promet on bet meur a dro hag a-fed yezh -laok pe get- e soñjan em deus kavet ase Mikael Madeg un ton dezhañ e-unan, fentus ha trist war un dro evel ar vuhez e teu a-benn da bakañ brav a-walc'h en e c'herioù. Plijet 'bet bet dija gant danvelezh 'zo eus "Ar Setiñ Postul" ha gant un nebulud eus e vrezhoneg-gou nevez embannet. Gouzhet e oan bet moarvat e-giz Yann Penn-haleg o vezañ en doa kavet ur skrivagner e vouezh. Un dra gaer evidomp-ni lennerien !

Soazig Lincoln (Plougerne)

DA C'HOUNIT GANT HO MINITEL

45 bilhed evit abadennoù zo eus GOUEL AR GELTED en Orient (5 d'ar 14 a viz Eost) : Alan Stivell, Beacon Blues, Martial Who's Band, Caper Gaille, Soldat Louis, Nozvezh Bras ar Gouel, Lojal, Folk Bro Asturia ha Gouel C'halis, Sontioù ha Dansoù Bro Asturia ha Bro C'halis.

EVIT-SE, GRIT

36 15

gerig TC

alc'houezh KELA

BETEK AR 1añ A VIZ EOST 1988

Roll GOUEL AR GELTED a zo gant

kelaouenn ivez ! grit 36 15....

DIWAN

3 BLOAZ



Evadod etre ar skipailh bedagoge ha skoldi da zont ar 6vet klas e miz Even

Bremañ : Ur skolaj a vo digoret gant Diwan e miz Gwengolo a zeu diouzh a lavarer ?

L. Kergoat Ya, e miz Gwengolo e stago Diwan ur mellad all ouzh e chadenn : digoret e vo ur skolaj e Brest. Un degad a vualle a vo degemeret er 6vet klas. Hanter bansionidi e vo lod anezho. Chom a raint da gousket teir novezh er skol ha mont a raint d'ar gêr evit an devezh merc'her hag an dibenn-sizhun.

Kement-mañ a zo doare pleustrek ar skolaj met graet 'm eus-me war-dro an dachenn bedagoge.

Bremañ : Petra a zo bet ret ober war an dachenn-se ?

L.K. : Ne vez ket krouet ur skolaj ken aes ha tra. Hag evit ur skolaj brezhonek, pe hanter-vrezhonek, eo gwiroc'h c'hoazh.

Ret eo bet da gentañ krouiñ binvioù evit gallout kelenn. Er stalloù-levrioù, er CRDPOù

ha ODDPOù (kreizennoù dafar skol ar Stad) ne gavo'h mann evit kelenn e Brezhoneg.

Skolaerien ar skolioù mamm ha kentañ Derez Diwan o deus ranket sevel o hentennou bedagoge o-unan, krouiñ o levrioù, o fichennou-labour ha kement bitrak a oa ezhomm.

Evit an Eil Derez e vo heñvel nemet emañ e teu brasoc'h an ezhommoù e-keñver dornlevrioù ha startoc'h ar c'hudennou yezh da ziskoulmañ : ret eo normalizañ ar yezh skiantel e Brezhoneg.

Bremañ : Penaos ho peus graet neuze ?

L.K. Tri bloaz zo emañ ganti. Galvet eo bet d'ar c'hennlabour an dud varrek a oa du-mañ duhont. Hag en em gavet ez eus ur bagad brav a dud ouz ar stern. Tost da 80 anv a zo bremañ war roll kennaouerien an Eil Derez.

Un dra gaer gwelet kement-se a vrezhonegerien desket o

stagañ ganti asambles dezho ar memes pal : ober diouzh hor yezh ur benveg kelenn evit ar rumad yaouank a zo o tont. Seul gaeroc'h ma labourer heñ evit ur bennoberezh Doue hag hep a-wechou.

Seul frealzusoc'h eo ma vez kavet mesk-ha-mesk, e-touez ar genlabourerien, kelennerien eus ar skolioù Stad ha re all eus ar skolioù prevez, skolaerien Diwan ha skolaerien ar skolioù diyezhek stad, ijinourien, teknisianed, medisinid, sekretourien ha me 'oar.

Al labour skiantel a ra fae war ar strukturoù-labour pe ar gergoù a galite. Pellid Diwan eo bezañ bet gouest da grouiñ ar c'hennlabour-mañ dreist d'an harzoù a blije da dreist d'an harzoù : un obeloù gwelet didreuz : un obeloù gwelet didreuz eo a vo dibosubl tremen hepti hiziviken.

Bremañ : Un obererezh yezhoniel -setu pezh eo ar skolaj evidoc'h-

EVIT OBER UR SKOLAJ

L.K. Arabat dilec'hiañ ar c'hudenn. Ur gudenn yezh a zo da gentañ evel just. Abaoe atav ez eus bet embannet fraezh gant Diwan e oa e bal kinnig da vugale Breizh ur sistem deskadurezh klok, adalek ar skol-vamm betek ar skol-veur. Kement-mañ dre ma n'hallont kaout nemet bruzen er skolioù Stad koulz hag er skolioù prevez.

Diazezet ez eus bet ur sistem deskadurezh nevez eta. Graet e vez gant ar Brezhoneg evel yezh kelenn evit a bep seurt danvezioù ; graet e vez kement gant hor yezh ha ma 'z eus ezhomm evit ma teuint da vezañ diyvezhek da vat.

Bremañ : Pesurt kont a Vrezhoneg a zo ret neuze ?

L.K. Diwar o skiant prenet eo o deus diazezet ar skolaerien ar c'hentañ derez al lodenn a rank degouezhout gant pep yezh.

Ret eo kemer ar bugel en e endro klok, skol hag all, a zo galleger muioc'h-mui ha gwelet penaos kaout ur c'hempouez yezh etre ar Brezhoneg hag ar Galleg. Div yezh kempouez a ray ur bugel diyvezhek. Ur yezh to-c'hor hag unan ya'ch ne ray ket ; distailet e vo abred pe ziwiezh an hini wan.

N'eus ket da blegañ war ar poent-mañ da reolennoù eus un amzer all ha pa vent melestradurel gall, d'ar peell pedagogel ne lavaran ket.

Abalamour da se e vo kavet er ovet klas ur c'hempouez yezh heñvel ouzh hini ar CM2. Er c'hlas-mañ e vez div lodenn a Vrezhoneg evit ul lodenn a C'halleg.

Er Skolaj eo tost da 50 % eus an amzer-studi a vo evit ar Brezhoneg, ouzhpenn 30 % evit ar Galleg hag 20 % evit ar Saozneg.

Bremañ : 20 % eus an amzer skol evit ar Saozneg ? Se a ra kata.

L.K. Un hanter muioc'h eget er skolioù all, a-dra sur. Ha setu perak ; gouzout a rit, evelod, n'eo ket gwall efedus ar c'helenn yezhoù er skolioù gall. N'eo ket e ve falloc'h ar gelennerien war ar yezhoù er vro-

mañ eget e lec'h all. Ar skolidi, Doue 'oar perak, n'int ket gwall droet da saoznegiñ.

Klasket ez eus bet eta en em soñjal war an doare da we-laot ar gelenndurezh-mañ.

Tennet hon eus kentel eus ar c'hentelioù "d'an daoulamm" da gentañ : kalz war verr-dermen a dalv muioc'h eget ar memes kont war hir amzer. Kresket eo bet niver an eurvezhoù Saoz-neg eta e penn ar mare studi, er ovet klas.

Ur yezh a ranker he c'helenn en un doare buhezek, diwar implij ha n'eo ket diwar dreñf. Kemeret e vo ur saoznegerezh a-vihanik gant Diwan kement ha bezañ sur da gaut ur c'homser naturel.

Ret eo stagañ an dra a zesker ouz ar pezh a vevel, temañ implij an abretañ ar gwellañ eus ar pezh a zo bet gwelet. Fremenet e vo ul lodennig eus ar bloavezh skol en ur skolaj a dramor abalamour da se.

Bez e tlefed bezañ gouest e-giz-se da gelenn unan eus an danvezioù-skol dre ar Saozneg goude un nebeut bloavezhioù. Staget gwelloc'h ne vo ken ar c'horz ouz an ober.

Bremañ : Ne zonjit ket d'ar programoù ofisiel, neuze ?

L.K. Ne lavar ket ar programoù e ranker stummañ skolidi mul, din da c'houzout.

An efedusted eo a glaskomp ha netra ken. Berraet eo bet ar prantadoù-skol ganeomp da skouer.

45 mm e pado pep prantadskol. I eur pe 55 mm a skol a reer er skolioù all. Koulskoude ez eus bet diskouezet splann abaoe pell 'zo n'hell ket bugale an oad-se labourer tenn e-pad ur prantad ken hir.

Re zias e vije bet adjeidiñ o anzerioù-labour d'ar gelennerien marvat, setu n'eus ket bet tu da cheñch netra marse. Un tamm mat gwevnoù eo melestradur Diwan.

Gant prantadoù berroc'h e

c'hallimp kelenn un danvez ouzhpenn, ar Brezhoneg (yezhadur ha lennegezh) ha ne vo ket ret d'ar skolidi kaout muioc'h a euriou skol.

Met kement-mañ n'eo ket program skol. Mont-en-dro eo ha netra ken.

Bremañ : Petra a rit eus ar program neuze ?

L.K. Ar programoù a ranker ober ganto, a-bell pe a-dost. N'eo ket falloc'h re Vro-C'hall eget re ar broioù all forzh penaos. Merkañ a reont un hent, ar c'hammedoù a ranker ober warnañ hag ar pal a ranker tizhout. N'eus ket da gavout abeg e kement-mañ, pell ac'hano.

Met un tamm klokaat a vo ret ober d'ar programoù evit pezh a sell ouz Breizh, a c'hallit krediñ :

Bezañ ur skol Diwan a zo bezañ ur skol gvriziennet don en he bro. Er Skolaj, da skouer evel er C'hentañ Derezh, o do tro ar vugale da adperc'hennañ istor o bro : kelennet e vo dezho gant e lojik emdreiñ dezhañ e-unan, dre an diabarzh ha n'eo ket atav evel ur stagadennig d'un emdroadur diavaez : Duke-lezh Breizh pe ar Breujoù o doa interestoù ne oant ket dalc'h-mat re Paris.


Met ouzhpenn an istor, daoust m'emañ amañ an dachenn splannañ a-dra-sur, a zo da vezañ loc'het e studi en ur gregiñ gant ar sell tost a-raok digeriñ war an holdler : ar c'heografiez, an ekonomiezh, studi an endro, an arzoù hag all a c'haller heuliañ evito an hentenn studi-se ivez. Ne reer ket forzh penaos un dibab res-tennoù gallek kennebeut.

Techet eo muioc'h mui ar programoù ofisiel da erbediñ an doareoù ober-se zoken.

Bremañ : Nevezintioù all a vo c'hoazh xar dachenn ar bedagogiezh ?

L.K. Savet ez eus bet 10 bodad labour evit an Eil Derezh. Pep hini anezho en deus kaset ar preder war-raok e-keñver an doareoù kelenn ouzhpenn dezhañ sevel dafar ha normalizañ e c'heriaoueg teknikel.

PENNAD-KAOZ GANT LUKIAN KERGOAT RENER BODADOU LABOUR AN EIL DEREZ



Andre Lavanant Prezidant Diwan, Lukian Kergoat rener pedagogel, Lena Louarn sekretourez an E.D.

"Penaos lakaat bugale ar ovet klas da adkavout an nerzh krouiñ o deus kollet alies abaoe n'int staget gant studioù renet strizh ar c'hentañ derezh ?" a c'houlenne Bodad an Arzoù. Klasket ez eus bet kavout ur respont da seurt goulen.

Prederiet ez eus bet war ar skolaj a-bezh ivez. An doare darempred a rank bezañ etre i-sill ar skipailh pedagogel a lakao ar skolañ da vont en-dro -Setu materi d'ten em soñjal. Penaos e vo santet, bevet ar skol gant ar vugale (ha n'eo ket gouzavet) ?

Klasket hon eus stankañ ar foz a vez etre mare ar c'hente-liou hag ar peurrest eus an amzer a dremenet er skol, etre ar re a zoug an titl a gelenner hag ar re a vez lakaet, re alies, en ur garg a vevshaer.

Un animator a vo e skolaj Diwan evit ar mare diavaez-kentel. Met ur c'helenner e vo an animator ivez war un nebeut eurvezhoù. Ar c'ontrol a vo gwir ivez ; ret e vo da bep kelenner tremen ur marevezh d'ober war-dro ar vugale e-diavaez o c'hentelioù. Ur c'helenner hag un animator amzer leun a vo e bloavezh kentañ ar skolaj asanbles gant daou gelenner all hanter-amzer.

Bremañ : Doareoù kelenn a zo met pe bal a lakait d'ar Skolaj ?

L.K. Komzet hon eus kalz a vinvioù betek-henn. Arabat soñjal avat eo bet gwelet ar re-mañ ganeomp en un doare teorikel nemetken.

Pedagogourien skiant prenet dezho eo ivez izili bodadoù labour an Eil Derezh. Iadoù pe mammoù a familh eo al lodenn vrasañ anezho ivez. Ha ma 'z eus bet ur soñj a zo bet dalc'h-mat en o spered eo hini ar vugale.

Ne vo kelennet e Brezhoneg -da skouer- nemet ar pezh a zo bet diazezet mat e labour prientiñ. Ne fell ket kennebeut all da greizenn ar geriaouiñ, a zo anezhi koef ar bodadoù-labour, kemer bugale Diwan da razhed doñv evit taolioù esa da ziazezañ n'ouzon ket pesurt lennegezh ar yezh gant harp pinvidigezh c'heriadurel ar rannyezhoù ha skouer ar yezh skiantel etrevroadel he deus homañ diazezet he labour.

Gant harp tud ar vugale hag ar vugale o-unan ez eus ur raktres desavadurel war ar stern.

Klasket e vo un doare daremprederezh er skol a lakao ar vugale da vezañ en o bleed, par ma vo gallet. Klasket e vo reiñ da bep hini an tu da vezañ gouest da ziorren e varregezh dezhañ e-unan.

Bezañ an efedusañ ar gwellañ eo ar pal a lakao d'ar c'helenn avat. Ne vo ket trawalc'h da Skolaj Diwan ober koulz hag ar re all ; ret e vo dezhañ ober gwelloc'h.

Bremañ : Perak bezañ roet anv Roparz Hemon da gentañ Skolaj Diwan ?

L.K. N'eo ket tamm ebet gant ur spered klask trouz daoust d'ar pezh a soñjo lod. Gwir eo emañ ROPARZ HEMON e-kreiz ar vread abaoe ur pennadig zo. Ha n'eo ket gant al loa vihan eur aet dezhañ.

N'emaon ket o vont da glask digarezioù evit e vankoù. Poent eo avat gwelet an tu skouer eus e oberioù ivez : Pet Breizhad all a c'hall lakaat war e anv un oberenn a skriva-gner war-un-dro hag ul labour a yezhonour par da hini Roparz Hemon ?

Ur Brestad a oa eus Roparz Hemon ivez ha 10 vloaz zo dres eo marv.

Met ar sell en doa Roparz Hemon war e yezh an hini en deus lakaet ac'hanomp da c'hoaz e anv hep an disterañ termadenn EVEL Roparz Hemon, troet eo EVEL Roparz Hemon gant Brezhoneg o bugale eget gant yezh o mammoù-you. ■

VOTADEG

COZAN, A-DRUGAREZ

Ar votadegoù evit Prezidant Republik Bro-C'hall e Breizh o doa diskouezet penaos o doa roet ar Vretoned ar brasañ eus o mouezhoù d'an tu kleiz, pe da nebeutañ d'an Ao. Mitterrand. Ur studi pishoc'h eus disoc'hoù an dro gentañ a lakae anat ivez e oant douget a-walc'h d'ar c'hreiz. Ar strolladoù bihan a gleiz hag an ekolojizet a sachet ivez war o zu gant tost da 10% eus ar mouezhoù en holl.


Ar votadegoù evit an deputeed n'o deus graet e gwirionez nemet kadmarnat ar pezh a oa bet merzhet : evel ma oa da c'hortoz eo deut en-dro ar voterien un tammig bihan war an tu dehou hag ar c'hreiz dre ma oa aet an Aotrou Mitterrand da beurlin war an dachenn-se evit bezañ dibabet.

Gwelet a reer koulskoude e ra muoc'h berzh ar P.C.F. dreist-holl e lec'h ma kinniget tud gwirizennet mat er vro evel Felix LEIZOUR a dizh ouzhpenn 30% e pastell-vro Gwengamp. Eno e ra berzh a-walc'h ivez ar strollad breizhek EMGANN o kinnig Jan-Mat SALOMON peogwir e tap 3,40% evit an taol arnod kentañ.

A-benn ar fin Aodoù an Hanternoz ne gaso da Bariz nemet kannaded eus ar P.S. Penn ar Bed a gaso 4 eus ar PS ha 4 a zehou (2 CDS, 2 RPR). An tri departamant all o deus anvet ur muiañ niver a dud eus an tu dehou. Etre tout, war ar pemp departamant eo ugent depute a zehou ha c'hwezek a gleiz a vo e Pariz en anv ar Vretoned.

KLEIZ-DEHOU KEIN OZH KEIN

Met, en tu-hont d'an disoc'hoù dre vras e c'hell bezañ dedennus studiañ a dost enalc'h ar voterien war un dachenn resis. Evit-se, pastell-vro "Kastellin Kreiz Breizh" a c'hell bezañ skerius evit meur a abeg : da gentañ peogwir e oa tost kenañ an daou zanvez kannaded en dro gentañ hollad mouezhoù an tu kleiz, a rae 50,12% dasparzhet evel-hen : 35,77% da Yolande BOYER eus ar PS,



DREGANTADOU KOLL HA GANNID J.Y. COZAN EN EIL TRO

9,37% da Daniel KREOFF eus ar PCF ha 4,98% da g-CAM hag Ifig REMON kinniget gant an "NEVEZOURIEM", an hini kentañ bet ezel eus ar PCF hag an eil ezel eus an UDB ha maer Sant-Hern e-Kichen Karaez.

En tu all e kaved Jean-Yves COZAN eus ar CDS, eil-prezidant kuzul departamant Penn-ar-Bed, kinniget gant an mouezhoù hag a dape 44,48% eus ar mouezhoù. An tu dehou pellañ, ar Front National, gant Eric CALDAOU du ne oa nemet 132 a zi-forc'h. Start e promete bezañ ar c'hrogad, hag ez eo bet peogwir eo aet ar maout en eil tro gant Jean-Yves COZAN war bouez 273 mouezh nemetken.

Ar pezh a zo sklaer eo en deus gounezet Jean-Yves COZAN er c'hantonioù a gleiz ha n'eo ket er c'hantonioù a zehou : e kanton Kraozon, de skwer, e rae an URC hag an F.N. 57,24% eus ar mouezhoù en dro gentañ. En eil tro, diwar 1085 mouezhier nevez ez eo aet ar muiañ niver war anv danvez kannaded ar P.S. da lavarout eo 557, tra ma ne yae nemet 528 war hini Jean-Yves COZAN. Gwir eo ar c'hontrol : e kanton Karaez, aet ar du gant an tu kleiz gant 60,9% eus ar mouezhoù en dro gentañ ez eus bet 1082 voter ouzhpenn en eil tro, 675 anezho aet gant paotr ar CDS, ha 407 hepkent gant plac'h ar P.S.

D'AN EMSAV BREIZHEK

Met pishoc'h e c'hellomp mont c'hoazh pa welomp ez eus etre dregantad an Nevezourion en dro gentañ ha kresk pe di-gresk mouezhoù Jean-Yves Cozan en eil tro dre ganton, evel m'hen diskouez ar gromenn amañ da heul : o lakaat dregantadoù KAM ha REMON en dro gentañ a-serzh, ha kresk ha digresk kannad ar CDS en eil tro a-lec'h, e c'hellomp renkañ an holl gantonioù lomp renkañ an holl koulz lavaret, en diavaez da ganton an Uhelgoad.

O kemer ar pennoù pellañ e welomp e c'hounez Jean-Yves Cozan 2,6% e kanton Karaez e-lec'h ma rae an Nevezourion nemet 1,84% e koll 1,5%. Komun Sant-Hern a ya da vezañ ar memes tu peogwir gant 31% evit he maer, Ifig REMON, e ro 5,1% a gresk da eil-prezidant kuzul Penn-ar-Bed.

Kanton an Uhelgoad a zo en diavaez d'al lezenn-se peogwir gant 3,68% hepkent evit an Nevezourion e ro ar c'hresk

brasañ, 8,56% ouzhpenn da Jean-Yves Cozan en eil tro : eus 26,65% da 35,21%. Met eno, ar PCF a reas 49,13% eus ar mouezhoù.

Meur a abeg a c'heller kavout d'an disoc'h-se : ar PS en deus broudet ar re a zo eus e du da vont da votiñ er c'hantonioù a zehou, ha mar teze ez eus bet tud o votiñ evit an F.N. n'int ket aet da reiñ o mouezh da g-Cozan. Diouz un tu all e c'heller soñjal n'en deus ket fellet da dud ar PCF pe an Nevezourion mont a-du gant Yolande Boyer, plac'h ar P.S. a-balamour da dabutoù an tu kleiz e Karaez. Met sur eo ivez ez eus bet kalz tud o deus votet KAM hag Ifig REMON pe mar teze n'int ket aet da votiñ en dro gentañ e-touez emsaverien Breizh hag o deus roet o skoazell da drec'hiñ d'un den en deus labourer un tamm mat hag a wel d'an holl evit difenn sevedadur Breizh hag interestoù ar Vretoned e Penn-ar-Bed hag e Kreiz Breizh.

bras ha bihan, o vrudañ hag o vrudañ evit ma vefe anavezet ar gudenn, paneveken, gant ar media.

Bes e ranker dezgas da soñj d'hon lennerien, betekout e vije bet steuziet diwar o c'horv, eo daou ginnig-lezenn a oa bet sinet gant an darn vrasañ eus kannaded Breizh ar PS, hag e oa o strollad an niver brasañ e Kamb Pariz eus 1981 da 1986, hep n'o devije teurezet an Aotrouez Mauroy ha Fabius, kentañ Ministrer en amercioù-se, pledañ gant kudennoù ken dister ha gwirioù hon yezh.

Bes e c'haller gortoz muoc'h digant gouarnamant Rocard hag zigarez en devo da genlabourat gant ar c'hreiz, en deus bet savet ur c'hinnig-lezenn, hag ankouezet en doa kenlabourat Mauroy gant PCF a ginnig e lezenn ivez, hep ma vije bet disoc'h ebet.

Bes e c'haller ivez bezañ diskreditik, gant ar skiant prenet diwar hon c'houston... Evel e 1981 e vo kavet abegoù brav da zaleañ un danvez-lezenn n'eo ket mui ken "mullus" ha ma oa da neuze, ouzhpenn ma n'hon eus klevet proeza resis ebet en taol-mañ, digant den.

E-lec'h kentañ war gannaded Breizh, pegen roz bennak e vent, evit difenn hon yezh er vat, e ve gwell kaout soñj n'eus bet biskoazh tamm reus ebet gante d'ar mare ma veze li-vet gevier bras, a-zivout liwan pe an danvez-lezenn, gant gouarnamantoù Pariz. Gortoz e teufe kema eus o ferzh a vefe gortoz re. Hag estrac'h evit gortoz zo d'ober.

LEZENN HA DANVEZ KANNADED

Goulnennet en doa "Engleo Evid Lezenn ar Iezoù" (savet gant "Engleo Breizh") digant an danvez-kannaded ha prest e oant da bouezañ evit ma vefe studiañ da votet ganteul lezenn a-zivout yezhoù "Bro-Frañs" hag un toullad respontoù a oa bet, a-du gant ar c'hinnig. E-touez ar re-se re ar gannaded-mañ dilennet en dro gentañ : Floch hag Arvault (PS o daou), ha Maujouan du Gasset el Liger Atlantel, Marcellin, Cavallé, Kergueris ha Bouvard (URC) er Morbihan ; le Pensec Bed ; Chouat ha Josselin (PS) en Arvor an Hanternoz ; Boucheiron (PS) ha Mehargnerie (CDS) en Il-ha-Gwilun.

Respont ebet avat ne oa bet a-berzh L. Richard (URC) dilennet e Porneizh, na Madelin (na vez ket pell o respont, e-skoaz re all peurvuiañe Redon. Respont ebet ivez a-berzh tud all dilennet en eil tro, evel Freville (CDS) e Roazhon pe Guichard (RPR) er Baol, nag a-berzh paotred Le Pen (met mar teze ne oa ket bet goulet digante...).

Nebeut a vrud a oa bet roet da gemennadenn an "Engleo" er c'hazetennoù, ha nebeutoc'h c'hoazh er skingomz hag er skinwel. Un tamm mat a labour en deus an "Emsav" d'ober ma kar reiñ pouez da gudenn ar yezh er vro, ha ne vo ket re gant an holl gevredigezhioù,

Bountañ, bountañ, evel e kanaouenn Lluys Ilach "L'Estaca" eo hon eus d'ober. War hon c'hannaded, evel just, war er c'hannaded, skingomz, skinwel hag all, hag an eil war egile, evit dont a-benn da aozañ un glemmadeg vras a-enep ar stad glemmadeg hon gwirioù hag a nac'h ouzhiop hon gwirioù hag a zo o vont da enoriñ "Gwirioù Mab Den" da vloaz. Bep ni ivez da brientañ ar bloavezh-stourmañ, ha ma c'hallfed bodañ an holl strolladoù en ur vanifesh-holl stadeg vras a-raok ar goañv ne radeg vras a-raok ar goañv. Da vefe ket an doare fallañ. Da vefe ket an doare fallañ e rankip c'honit hon gwirioù e rankip dihinñ. ■ N.K.

KANAKI

"LAZHADEG OUVEA



"betek 1970 e konter teir emsavadeg hag hanter-kant. En o zoues ez eus hini 1978 e-lec'h ma kavas ar marv ar penn meur ATAI, hag unan e 1917 ma voe lazhet mamm-gosh Yann-Vari TIBABOU".

Er bloavezhioù diwezhañ ez eo bet politikerezh ar Stad C'hall lakaat ar Ganaked da vihan-niver en o bro. Termetet eo bet ar pal-se en ul lizher-kelc'h gant Pierre Mesmer. Gant statud nevez Edgar PISANI e oa laouen a-walc'h ar Ganaked peogwir e roe tro dezho da gregiñ d'an em ziorren e framm teir rannvro a oa en o dalc'h, e kreiz an Enezenn Vras, en hanternoz hag en inizi.

PONS :
TREVADENNIN ADARRE

Gant Poñs avat ez eo aet kalz war gil o c'halloud hag o emrenerzh : tennet ez eus bet ar c'hant digant ar rannvroioù. Adroet ez eus bet douaroù d'an drevedennerien. An "Emsavadur Sevenadurel Kanak" a zo bet lakaet en e blas un "aozadur kaledonian". Niver ar soudarded a zo bet lieskementet. Aloubet eo bet ar vro penn-da-benn, "taolioù gronnañ ar boblañs" a veze aozet bep ar mare. Bombezennoù a veze lakaet a-enep ar Ganaked. Ha bep taol hep na ve graet netra a-enep ar rae gwailldaolioù pe a lazhe ar Ganaked. Met kement-se a oa gwir ivez diand anezherzh ar sosia-listed : e miz Gwengolo 1981 eo ez eo bet lazhet Pierre DECLERCQ hag e miz Kerzu 1984, dek ezel eus meurriad Yann-Vari TIBABOU e Hienghene. E miz Genver 1985 ez eo ar G.I.G.N., bagad stourm ispisial an arme, a lazhe Eloi MACHORO, Sekretour an Unvaniezh Kaledonian, ha Marsel Nonnaro. Da geñver referendom B.Pons e miz Eost 1987 e vo difennet uzh ar Ganaked manifestiñ tra ma vo aotreet manifestadeg "Glas-Gwenn-Ruz" ar C'hallaoued

ENKLASK DIWAR-BENN
DARVOUDOÙ OUVEA

Kement-se a ziskouez e pe-seurt aergelc'h eo c'hoarvezet darvoudoù Ouvea. Un enklask a zo bet graet gant Komite Pierre Declercq ha 42 testeni a zo bet sinet ha dastumet.

D'an 22 a viz Ebrél ez a dagañ ti an archerien e Ouvea. Fellout a rae dezho hepken derc'hel an dud ha lakaat banniel Kanaki e-lec'h an Tri-liv. Un darvoud boutin eo abaoe meur a vloavezh du-hont. Met unan eus an archerien a denn war ar Ganaked. Ha da heul ez eo pevar archer a vo lazhet.

O welet kement-se ez eo nec'het ar Ganaked, ha kavout a reont gwelloc'h tec'hout war-du norz an enezenn o kas ganto an archerien. Met, ouzh o gwelout o tont, ez eo tec'het kuit holl dud keriadenn Gossanah er strouezheg gant aon da vezañ gwallgaset gant an arme e-giz ma c'hoarvez bewech pa vez darvoudoù. Neuze ez a ar bagad emsaverien, gant an archerien o deus paket, da guzhat en ur vougev.

42 TESTENI

D'ar Sul 25 a viz Ebrél, da bemp eur mintin e tau an arme gant ar G.I.G.N. da aloubiñ ar gériadenn. Berniet e vez ar merc'hed hag ar vugale e-barzh ul lochenn, ar baotred a vez goulnataet a-hed an deiz evit gouzout pelec'h e oa kuzhet an ostajoù. Staget e vezont ouzh peulioù, boureviet a daolioù penn-bazh tredan pe a daolioù "rangers".

"An hini a skoe a oa ur c'hougoul o kuahat e benn" eme unan eus ar rae a roe e desteni. "Ne veze gwelet nemet e zaozadeg". Unan all a zispig e oa bet lakaet ur gouriz en-dro d'e goug hag e veze stardet d'e lakaat da gomz. Ober a reer van da droc'hañ e zorn gant ur vouc'h'al. Unan all c'hoazh a lar e oa bet lakaet nozh a-dreñv d'an iliz, skoet warnañ war e benn-daoulin a daolioù rangers ha tennet taolioù fuzuilh just en e-gichen.

'ZO BET UN DIBAB "

Un den kozh a oa bet torret gantañ e droad ha deut eo soudarded ar G.I.G.N. da bouezhañ warnañ. D'an ampent eo bet gwelet Bernard Poñs, ha test eo bet eus an darvoudoù-se.

UN ENGLEV OA POSUBL GANT
AN DALC'HERIEN

An darempredoù gant Kanaked ar vougev a zo bet disheñvel-tre diouzh an dezenn ofisiel. Lavaret eo bet e oa ar c'homandant Le Gorjus en doa graet al liamm etre ar Ganaked hag ar C'hallaoued. Faos eo hervez ar Ganaked, peogwir d'ar 27 a viz Ebrél e oa bet lezet le Gorjus da vont kuit evit goulnenn e vefe lezet sioul tud ar vro gant an arme. Goude, n'eo ket deut en-dro d'ar vougev. N'eo ket en neuze en deus kaset armoù d'e genseurted. Hervez ar Ganaked n'hell bezañ nemet ar Prokolor Bianconi en deus kaset an div arm d'an dalc'hidi peogwir ne veze ket furchet o vezañ m'en em ginnige evel un hanterour, distag eus an arme hag e lavare klask un emglev hep lakaat gwad da skuilhan.

Pemzek Kanak a zo bet lazhet e-pad tagadenn ar vougev. Ar soudarded c'hall o deus embannet e vefe lazhet tud er meurriad ma ne vefe ket dieubet an archerien. Neuze o deusasantet ar Ganaked en em reiñ. N'eo nemet goude-se, neuze, eo bet lazhet Alphonse DIANOU, penn ar skipailh, ha 3 c'hamaled all dezhañ.

Un dra all a zo sur : gouzout a rae ervat ar C'hallaoued e vefe dieubet an archerien buan a-walc'h goude ar votadeg, rak, hervez ur c'hiz eus ar vro e oa bet prientet dija degemer ar 24 archer er gériadenn. Anat eo eta e felle da Bernard Poñs

ha d'ar gouarnamant diskouezh e oant ar vistri : lazhañ ar Ganaked savet a-enep d'o c'halloud a oa ret ober arak ar votadeg e Bro-C'hall.

A-hend-all hervez ar gaze-tenn "Politis" ez eus un test all, an archer "Alberto", a oa e-touez an dalc'hidi ha n'eus roud ebet anezhañ. Hennañ a zo deuet er-maez eus ar vougev da lavaret d'e genseurted e oa posubl en em glevout gant ar Ganaked "Louzaouet" e vefe en un ospital e Bro-C'hall peogwir e vefe tapet gant "kleñved Stockholm" dre m'eo savet a-du gant e zalc'herien. ■

T.L.

SKRIVAÑ D'AN DOULLBAC'HIDI

Hiraat a ra bepred listennad an doullbac'hidi politikel e Bro-C'hall. Pemaes dibab da biv skrivañ. Klevet hon eus e oa bet bac'het ar Ganaked Marie-Adèle JOREDIE (gweg prezidant unan eus rannvroioù Kanaki) a oa deut d'ober un droiad e Breizh un nebeut mizioù zo evit studiañ pemaes e yae en-dro ar skolioù DIWAN. Skrivañ dezhi : Marie-Adèle JOREDIE - B.P. 491 - Camp Est - NOUMEA - KALEDONIA - (Nouvelle Calédonie) -



E-pad meeting Kemper, a gleiz da zehou : Gilbert Nicolas eus Ksiste skoazell da Bobi ar Ganaked, Cyriaque ALOZIO, Jacqueline DETEIX ezel eus an FLNKS

Cyriaque ALOZIO eil-maer e OUVEA

E miz Mezheven eo deut da Vreizh dileuridi eus kanaked an FLNKS. D'an 21 e oant bet pedet e Kemper gant ar C'huzul Skoazell da Bobi ar Ganaked. Tri e oant : Dominique ONRAED, a orin Europat, niz Pierre Declercq hag ezel Kuzul Pierre Declercq savet da zifenn ar justis er vro ha dezhañ anv rener an Talbenn evit an Dieubidigezh bet muntret e 1981 ; Cyriaque ALOZIO, eil-maer e OUVEA, ha Jacqueline DETEIX ezel eus an FLNKS.

O fal : reiñ da anaout ar pezh a zo c'hoarvezet e gwirionez an enezenn OUVEA da geñver taolioù nerzh miz Ebrél ha miz Mae diwezhañ ha lazhadeg ar Ganaked a oa o terc'hel soudarded c'hall er vougev.

OUZHPENN UR C'HANTVED
A EMSAVADEGOU

"Da gentañ e ranker kaout soñj eus istor an enezenn : abaoe an aloubidigezh e 1953, n'eo ket an darvoudoù kentañ a-seurt-se" eme Dominique ONRAED:

KLASOU DIVYEZHEK AR SKOLIOU STAD

0,148% EUS SKOLIDI AR C'HENTAN DEREZ ER C'HLASOU DIVYEZHEKI

HA RE A VEFE EVIT AN DESKADUREZH-STAD?

War an ton bras e oa bet lidet digoradur an diskoù -zadeg hag ar sizhunvezh war an divyezhezh savet gant an APEEB e LANUON. A-gevret e oa bet gwelet ha klevet Enseller Aoñon an Hanternoz (Ao. DE KEYSER), maer Lanuon (ao. NEDERLEG), eil prezidant Kuzul an Departamant, P.Y. TREMEL (anvet kannad en e vro abaoe) hag an ao. LEGRAND, rektor an Akademiezh.

Berzh bras a reas prezegenn Claude HAGEGE e dibenn ar sizhunvezh, pa oa degouezhet tost da 250 den da seloù anezhañ. Anavezet eo ar yezhoù, met betek-hen e oa bet troet e sonjennoù ha levrioù war-zu yezhoù ar bed holl kentoc'h eget war re e vro. Goude bezañ tremenet un dezvezh a-bezh e klasoù divyezhek LANUON, e tisplegas e oa a-du krenn evit ma vefe diorroet deskadurezh ar brezhoneg e Breizh, en ur venegiñ e vez talvoudusoc'h eget un doare heñvel e saoneg.

Gant an Ao. LEGRAND e oa bet distaget komzoù flour ivez, en ur venegiñ labour bras ar skolaerien, hag en ur reiñ da c'houzout e vefe kendalc'het gant an hentenn-se e Breizh.

Sivazh, pa seller ouzh respontoù pe enalc'h an Ensellerien en Departamantoù, e weler emañ pell Yann diouzh e gaez :

-E ROSTREN (22) e vo war-dro 40 bugel a-benn ar bloaz ; goulennet e vez ur skolaer nevez gant an APEEB eta. Respont an ao. Dekeyser : ne vefe ket aotreet ar c'hlasoù divyezhek da zegermer bugale azek 2 vloaz e miz Gwengolo !

-Memestra e KAWAN (22) gant 30 bugel ha memes respont gant an Enseller : difennet ar c'hlas divyezhek d'ar re vihan ! (Kemer harp a ra an Ao. Dekeyser war prezegenn C.HAGEGE evit ma'ñ degemer ar re vihan er skol, ar pezh a zo kontrol-bev ouzh e gomzoù !).

-E LANESTER (56), n'en deus ket respontet an Enseller ouzh ur goulenn krouidigezh bet graet e miz Gouere 1987 ha adkaset e 1988, daoust d'an 30 a dud en-skrivet.



-E REDON (35), 50 bugel a-du e-kerz an enklask ; goulenn a ra ar familhoù ur c'hlas divyezhek hag ur skolaer-bale. Nac'h a ra an Enseller war zigarez m'emañ re ziezhat (e miz Meurzh !!).


-E ROAZON, gant 60 bugel azalek ar CP betek ar CM2, e oa ret kaout un den ouzhpenn evit disammañ ar skolaerien, dreist-holl pa vez daou live e pep klas pe dost. Nac'hañ a ra an Enseller-erezh.

-Goulennoù nevez ivez a ziwane TREGASTEL (22) hag en ALRE (56), keit ha na vank bep bloaz skolaerien-bale...

Re hir eo al listenn. Petra 'zo bet graet gant ar Stad evit stummañ skolaerien abaoe 5 bloaz ? Ur staj eizhetiz e miz Mae 1988 ! Perak ne vez ket krouet an DEUG ? Perak ne vez ket digoret ur stummadur en ur skol normal ? Perak ne c'hell ket distreiñ da Vreizh skolaerien barrek war ar brezhoneg ? Perak ne vez ket kresket gopr ar skolaerien divyezhek ? Efe-dusoc'h e vefe un dekred war an danvezioù-se eget ul lezenn vras war ar yezhoù rannvro. Ha c'hoant en defe an Deskadurezh-Stad e tigriskeñ an dregantad a skolidi er c'hlasoù divyezhek eus 0,148 da 0,0148 ?

A.P.E.E.B. miz Even 1988

Yann Leskildri



TAOLIOU PLUENN

UN HENT EFEDUSOC'H EVIT AN EMSAV GANT PAOL AR MEUR

Aliañ a ran an emsaverien da zibab un hent disheñvel, un hent a zalc'hfe kont eus enkadenn ar sentifin, un hent a vefe anatoch'enn efedoù o oberoù d'ar re a gemerfe perzh el labour, an hent nemetañ a c'hellfe ober d'an emsav mont war-raok. ■

En Taolioù Pluenn an niverenn diwezhañ e tamalle Tangi ar Bleiz da A.Keravel bezañ cho-met hep "goulenn netra evit ar Brezhoneg" digant Kaul Kêr Vrest. (Gwellet pajenn al lizhiri.). Kavet a welec'h emañ respont A.Keravel da d/Tangi ar Bleiz.

(...) Karget e oan bet e 1990 da gas war-raok sevenadur Breizh e buhez ar gomn. Dindan ar gang-mañ, ha goude meur a emvod gant ar c'honklusionoù em boa kinniget d'ar c'huzul-hêr ul listern gantañ a banelloù divyezhek da vezañ plasat war savadurioù an ti kêr.

Un tregont bennak a banelloù o tougen un anv galleg hag o zrovidigezh vrezhonek a voe prientet, e 1982 da gantañ penn Al lod brasañ anezho a zo chomet en o flas ; ar c'huzul-kêr nevez dilennet e 1983 n'en doa graet nemet stagañ oute logo glas ha ruz ar gêr. An enskrivadurioù-mañ a c'heller gwelet ouzh an Ti Kêr hag an Ell-Tier-Kêr evel er Peder Milin, Lambazelleg, Sant Mark hag all... ouzh Skol an Arzouz Kaer, Mirdi Kêr-Vrest, Kreizenn tagoù ar Vilin Wenn, hag all...

Anzavit ho piñe gallet chom hep klask abeg ouzh an hini a zo kiriek eus al labour-mañ... Tamallet e vez din bezañ chomet hep goulenn digant ar re 'zo e karg eus an Ti-Kêr bre-mañ, bezañ kendalc'het raktrez ar re a oa en o flas araoze, pe bezañ chomet hep kinnig ur raktrez all... Gwall unteek e kavvan hevelep rebech ha diest e oa e taufe ar goulenn-mañ diouzh ur c'huzulier eus ar c'huzul kozh ?...

Arv a rit eus kement-se dresd'ar poent m'eo bet degemeret gant urvan eus Ell-Maered Brest, dileuridi meur a strollad breizhek eus Brest, war intrudu "Kanevedern", en o zouez

e oan en anv "Engleo Breiz", a-sambles gant ma c'hamaraded eus Ar Skol Vrezhoneg ha Brud Nevez. Kinniget hon eus meur a dra evit ma vefe graet plas d'ar Brezhoneg e buhez ar gomn. Diwar an degemer a zo bet roet d'ar goulenn boutin-mañ e c'heller soñjal e vint klevet gant ar Maer hag e vo tu dezho adstagañ er mizioù o tont gant al labour baulc'het e 1982.

Armand KERAVAL
Ken-Sekretour ENGLEO BREIZ
Unan eus sekretourien ar C'hvaldenn-Goulennadeg evit STATUD AR BREZHONEG HA YEZHOU BRO-C'HALL.

ISTOR HA DEIZ-HA-BLOAZ

Keit m'emañ ar C'hallaoued o prientifin, abaoe tost da 10 vloaz bre-mañ, lidoù Dispac'h 1989, ne weler e kasetnoù Breizh tost netra diwar-benn ar pezh a c'hoarvezas e 888, 1488, 1788, hag int bloavezhioù pouezus eus hon Istor.

E 888 e voe faezhet ar Vikinged e Kistreberzh gant Alan Veur, ha ren a reas ar peoc'h da heul trec'h ar Vretoned unanet.

E 1488 e voe trec'het arme Vreizh e Sant Albin an Hilber gant Galloued Charles VIII. 500vet deiz-ha-bloaz an emgann-se a voe lidet e miz Gouere 88. Banvezioù a vo en enor d'ar 6000 a Vretoned marvet en deiz-se evit derc'hel Breizh dieub.

E 1788 en em save Pobl Roazon da zifenn Breizh harluet gant ar Roue. 200 bloaz war-lerc'h e vo gortozet 1989 da varmaozañ lidoù Paris.


E 1978 e varve Roparz Hemon e Dulenn. An dekvet deiz-ha-bloaz-se a vo lidet gant ER3, Skol-Uhel ar Vro, Kuzul ar Brezhoneg, Kevnerien an darvoudoù-zhones, Kevnerien an darvoudoù-zhones, ha vev ar re all, an se an eil re gant ar re all, an niver a dud e kont e pep hini ouzh niver an dud e kont el liouzh niver an dud e kont el liouzh da vo (pe na vint ket) aozet -a lak da sevel en unan evel un tamm nec'hañs a-zivout emskiant hon Istor en hon Bro. ■

Yann Leskildri.

DOUARNENEZ

EUSKADI-BREIZH 1989

GOUEL SINEMA AR MINORELEZHIU BROADEL



Eus ar 27 a viz EOST betek an 3 a viz GWENGOLO eo pobl EUSKADI a vo pedet e Douarnenez. Abaoe 1978 e veaj Festival Sinema ar Minorelezhioù Broadel eus un tu d'ar Bed d'e-gille, o klask lakaat anavezout filmerezh ar pobloù ha sevenadurioù gwasket pe disoñjet ha nac'het.

N'eo ket souezh eo e Breizh e vefe ganet ur seurt kejadenn: an diaesterioù da vevañ hervez e wirvoud, mougard sevenadur ur bobl hag he yezh a anavezomp ivez. Evit mont a-enep an ankounac'h-se ez eo ar sinema ur benveg dibar ha diskouez a ra, bep bloaz, pinvidigezh sevenadurioù buhezek.

Abaoe dek vloaz e kinnig Festival Sinema ar Minorelezhioù Broadel ur roll a vesk filmoù istorel, filmoù a-vremañ ha filmoù faltazi pe danevel-liañ. Met bez ez eo ivez ul lec'h keññ hag eskemm, keñveriañ skiantoù-prenet ha diduiñ gant sevenadur bev ar bobl pedet.

KENDIVIZIOU

Ur roll displegadennoù ha kendivizioù stank a zo bet pri-entet dija :

- Istor ha buhez a-vremañ EUSKADI gant an istorour Marrex Goyenche, Joseba Alvarez, ezel eus Parlamant Europa, Eva Forest kazetennerez ha skrivagnerez.
Sinema ha video e Bro Euskadi gant kevredigezh ar realizatourien, produktourien ha filme-rien.

Yezh ha deskadurezh gant ar gevredigezh A.E.K. a ra war-dro deskadurezh ar yezh.

Binvioù kelaouiñ ha skinwel gant renerzh EUSKAL TELEBISTA (skiwel emren Euskadi).

Politikerezh Sevenadurel ha sevenadur poblek gant ar gevredigezh EKB.

Ekonomezh ha kooperativedi diwar-benn sistem MONDRAGON.

Eskemm etre pesketourien Euskadi ha pesketourien Breizh aozet gant O.P.O.B. (kevredigezh kenurzhiañ Peskerezh Kornog Breizh).

C'HOARI HA DUDI

A-hend-all e vo diskouezet penaos c'hoari "bolotenn euskarat". Bez 'vo diskouezadegoù diwar-benn an Euskareg, sone-rezh, kan ha diskouezadegoù ar-zel.

Ar Gwener, evel boaz, a vo gouestlet da filmoù Breizh ar bloavezh. Roet vo priz ar Festival d'ar film gwellañ hag ar priz AR MEN d'ar film a gomzo ar gwellañ diwar-benn Breizh.

Skeudenn Breizh a-dreuz filmoù bras a vo diskouezet hag un tabut a vo war-lerc'h.

Dalc'het e vo erfin Breujoù ar Sallet ha Klevet e Breizh ha studiet e vo disc'hoù an dekvet steuñv e-keñver ar sevenadur e Breizh.

T.L.

NIVERIDIGEZH

1989

Betek-hen n'eus bet, diouzh ma ouzomp nemet SAB hag Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg o kemenn deomp o doa graet un dra bennak evit gouennet e vefe niveret ar vrezhonegerien. Lizhiri zo bet kaset d'an holl gannaded ha da Rocard gant SAB, da brezidanted ar C'huzulioù Rannvro gant UGB, ha d'an INSEE gant an div gevredigezh, evel just.

E Kannadig Diwan niverenn 89 (miz Mae 1988) e oa ul lizher gant Padrig an Habask a lare kement-mañ, o komz eus kendiviz EUROSKOL : "Daoust na n'eo ket bet evit heuliañ ar c'hendiviz am eus bet tro da goma gant ar c'helenner Mackay ha da hriaziñ e vuzuzegñ war dachenn an darempredoù etre ar yezhoù. Reñ a ra d'e studierien a bevar c'horn ar bed un hentenn resis a enklask war stad an traoù en o bro. Goude an enklask pizh ha skiantel war an dachenn hepken ez eus tu da dementañ ur politikerezh yezhel diazezet mat evit ar yezh-mañ yezh. E Bro-C'hall avat n'eus tu da diazezañ politikerezh yezhel sirius ebet dre ma n'eus nemet ur yezh anavezet gant ar Stad vroad abaoe amser an Dispac'h, dre ma taver war an holl re all ha dre ma ne glasker karout sifri ebet diwar-benn yezhoù an dud en niveridigezh gall... Anavezet-mat eo an dra-se goudeomp, hogen diskouez a ra deomp ivez war be da kregiñ evit bezañ gouest un dez da dementañ ur politikerezh sirius evit ar brezhoneg e Breizh."

Ha setu perak ne c'hellimp ket mont war-raok hep niveridigezh ar vrezhonegerien.

E "GARN" diwezhañ (nevez-amzer 1989), kelaouenn drimuziek ar C'hevre Keltiek, e kaver daou bennad o tennañ da niveridigezh Breizh-Veur e 1991. Goullenn a ra Kernevez e vefe niveret ar gernevegerien. Goullenn a ra ivez izili ar C'hevre e Bro Saoz e vefe enklasket niver ar gomzerien yezhoù keltiek e Bro Saoz hag e Breizh Veur (ha neket niver ar gembrageerien e Kembre hag hini ar ouezelegerien e Bro-Skos hepken). Hag anavezet e vo niver brezhonegerien Breizh Veur a-raok hini Brezhonegerien an douar bras ?

M.K.



KELEIER

Dalc'het ez eus bet hiriv (27 a viz Mezheven) ur prosez-galv nevez a-enep 3 ezel eus Stourm ar Brezhoneg, bet paket ur bloaz 'zo o livañ panelloù tro-dro da Roazon. Daoust da gomzoù flour ha sioul ar Prokolor, e verkomp n'eus cheñchamant ebet e gwaskerezh ar Stad C'hall a-enep deomp dre ma oa bet goullennet adarre pevar miz toull-bac'h gant gourez a-enep d'an damallidi, evit 5 panell dust. N'eo ket e-giz-se koulskoude e chomimp a-sav gant hor stourm evit panelloù brezhoneg war vord an hentoù hag evit Brezhoneg Yezh Ofisiel e Breizh.

E-touez izili ar c'houarnamant sokialour diwezhañ ez eo distroet an Aotrou Jack LANG e penn ar Sevenadur. Soñj hon eus eus pezh en doa lavaret en Oriant tri bloaz 'zo. Klaouestre e talc'ho soñj eñ ivez hag e lakaio war pleustur pezh en doa kinniget, da skouer en ur lakaat panelloù Brezhoneg war pep hent e Breizh.

Stourm ar Brezhoneg

Stourm ar Brezhoneg en deus goullennet un emgav gant Charles Josselin, Prezidant Kuzul Departamant Aodoù an Hanternoz evit klask "planaat an diaesterioù" a zo etreaz.

Fellout a rae da S.A.B. diskouez eo ur stourm atebek a zo bet renet gante. "N'eus ket ur bagad drierien ac'hannomp", e-mezoñt "met ur strollad a venn gouñt ur statud a yezh ofisiel d'ar Brezhoneg e Breizh. M'hon eus bet kroget gant ar stourm ouzh ar panelloù-hent ez eo dre ma kav deomp eus o skrivadur an anvioù-lec'h un eo arouezioù splannañ an dismegañs a-berzh-stad maget ouzh ar Brezhoneg.

Diskouezet hon eus ivez e laka an doareoù-stourm-se, daoust pegen taget ma vezont gant hag hini an dilemmidi. Petra plas ar Brezhoneg war bord hennerien Breizh ez eus tu da soñjal pegen bihanoc'h e vije ma ne vije ket bet eus labour STOURM AR BREZHONEG."

Da heul respont C. JOSSELIN na ginnige dezho emgav ebet en deus diskleriet ar strollad : "An aotrou Josselin n'en deus ket respontet d'hon goullenn emgav. Setu ma'z omp adrog gant hon labour dre hentoù-departamant Aodoù an Hanternoz, evel ma kendalc'homp war hentoù ar pevar departamant all e BREIZH ha war an hentoù-stad, hep dament an arvaroù hag ar c'hastizoù.

Rak ne vez ket roet deomp an dibab. Mar fell deomp e vefe ar Brezhoneg e vo ret en difenn, gant ar c'heuz a c'heller magañ ouzh disablanted ha pil-pouster an dilemmidi."

Meur a reked o tennañ d'ar Brezhoneg a oa bet barnet e miz Mae gant Lezvarn ar Velestradurezh e Roazon. Peder a oa bet savet gant Klaod an Duigou, eus Moelan. Unan o c'houllenn digant ar P.T.T. skrivañ e chomlec'h e brezhoneg war o c'houllenn digant an Tailhoù skrivañ e chomlec'h war e baperoù-tailhoù, div all o tanall d'ar P.T.T. chom hep kas lizhiri gant ar chomlec'h skrivet e brezhoneg.

Ur reked all a oa bet savet gant Mark Kerrain da c'houllenn e vefe skrivet e chomlec'h e brezhoneg gant an Tailhoù ivez.

Ar pemp reked-se zo bet distaolet. Darn a vo kaset dirak ar c'huzul-Stad, re all a vo kaset dirak Kuzul Gwirioù Mab-Den e Jeneva. (An dud a garfe gouzout hirroc'h diwar-benn ar sevel rekedoù evel-se ha klemm a-enep d'ar Stad C'hall e Strassburg pe Jeneva a c'hall skrivañ da v-Bremañ).

Klemm dirak Kuzul Etrevroadel Gwirioù Mab-Den e Jeneva o doa graet Serge Richard ha Ronan Trezel gant o diaesterioù e-barzh o labour o kelenn brezhoneg e Bro-Bariz. Ma n'eo ket bet degemeret klemm Serj Richard, o vesañ ma ne oa ket bet dirak ul lez-varn

c'hall da gentañ, he deus servijet hini Ronan Trezel d'ar C'huzul da c'houllenn digant ar Stad C'hall diskleriadurioù war he doareoù-ober, ken e vo ret dezhi respont.

Meur a glemm all a zo bet kaset da Jeneva, ret eo gortoz an disoc'h c'hoazh. Met an holl lemmerien a c'hallfe kemer perzh er glemmadeg-se diwar-benn bresezerezh hon gwirioù ma karfent. Gortoz a reer o lizhiri eta.

M.K.

Un toullad mat a vizioù zo oa bet kaset ul licher d'an Aotrou Haer e Gwened gant ar c'honorall (war e leve) Lindrec evit klemm ouzh ar Gwenn-ha-Du diskouezet asambles gant banniell kêr Wened, hini Europa, hag hini Bro-C'hall, dirak an ti-kêr. Evitañ ez eo ur vezh ruz diskouez un arouez a zisrannned eveltañ...

An hevelep Lindrec a oa bet o kinnig e anv evel danvez is-kannad n'eus ket pell 'zo gant ar Mezeg Magnien (Kuzulier en Aradon) evit difenn menozioù faskour ar "Front National".


Enzalc'h unan eus e izili oberiant evel hemañ ne vir ket ouzh ar "Front National" a implijout ar Gwenn-ha-Du en e vanifestadegoù... kement ha rastellad mouezhoù...

Noteon : ar Gwenn-ha-Du a oa bet tennet war-lerc'h al lizher-se, met adlakaet war-lerc'h lizheroù all...

Herve MAHEO

BEP DAOU VIZ LENNIT
AL LANV
59, hent
KERDROMOU VIVAN
29000 kemper
KOUMANANT BLOAZ 100 l
SKOAZELL : adalek 150 lur.

BUGALE ARBAT



Daoust ma embanne Stalin bezañ heñ Lenin e oa bet dizemglev etre an daou zen.

En e destamant chomet kuzh betek marv Stalin e c'houlennas Lenin e vefe tenet e garg digant Stalin a oa re strizh d'e veno.

man en ur reñ dezhañ ur serviedenn broc. Sec'hin a reas Stalin e vuzelloù. "Ha netra tom hiziv". Kemer a reas ar rastell-dent ha sellet a reas pizh outañ.

"Ur rastell vat eo, graet eo gant davez mat, ur c'hemmesk aour, platin ha paladiom. N'ho po ket eshomm anezhi ken, graet 'vo unan nevez deoc'h. Met gousout a rit, Josef Visarionovitch, gwelloc'h e c'hellfe bezañ ober unan simploc'h."

"Penaos unan simploc'h ?"

"Ma, amañ eo dalc'het an dent gant ur rastell vetal pa c'hellfed ober unan blastik pem da benn."

"Perak ober-se ?"

"E girionez, Josef Visarionovitch, itag eo ur rastell vetal ouz an dent gant an daou grog bikan-mañ a reer ruilhennou anezho. Keit hag e chom skañv ar rastell ne waok ket re war an dent. Met seizh dent faos ho peus war ar rastell-mañ dija, ha pommer eo, re bommer. Emaomp o vont bremañ, da lakaat un dent ouzhpenn warni, ha pommeroc'h e vo c'hoazh. Ur valenn blastik a c'hell pegañ ouz ar skañv ha dougen kement a zent faos hag ho peus c'hoant."

"C'hoant ho peus reiñ din dent faos evel un den kozh ?"

"Perak evel un den kozh ? An dud kozh n'o deus dent ebet ken, p'ho peus c'hoant ho tent gvir. Ha darc'hel a reoc'h anez-

ho e pad pell c'hoazh, mar plij da Zous."

Un nebeut bloavezhioù 'zo, pa oa bet tennet un nebeut kildent digantañ e oa bet kinniget dezhañ lakaat ur rastell. Ne c'hell ket ober se. Un den kozh gant dent faos ! Gwellet an doa tud kozh o tennañ o dent faos evit an noz ha lakaat anezho en ur werennad dour. Met displeget o doa an dentourien da Stalin ne oant ket e soñj reiñ dezhañ ur rez-dent en he fezh, met ur rastell-aour evit darc'hel ar c'hildent faos, dezhañ da goust peadra da chaoket a voued. Graet o doa ar rastell ha deut e oa da voazañ outi. Diwezhatoc'h pa voe bet lamet kuit daou zant ouzhpenn e oa bet kinniget dezhañ ur rastell danav diouz ar seurt e oa kaoz gant Lipman bremañ, hag evit ar memes abegoù. Met nac'het en doa ha graet o doa ar rastell a oa e daouarn Lipman bremañ, hag en desped dezho bezañ berzet anezhañ e oa deut brav ganti.

Bremañ e kinnige Lipman ur rez-dent den kozh. Un den strizh a spered e oa Lipman ne vele nemet ur praktik ennañ ha disoñjal a ra e oa milionoù a dud o parañ war e "bratik". Ne c'hellfe ket chom en e sav diraze gant ur rastell laosk, zeal ha komz evel pa vefe leun a yodkerc'h e c'henou.

"Grit unan aour din" eme Stalin.

Ne gredas ket Lipman enebij pelloc'h. "Ya, evel just."

Ma ra poan deoc'h ar gouli, kemerit unan eus ar c'hachedou-mañ ha galvit ac'hanon ma 'a eo ret. Diakouez a reoc'h din penaos ez a en-dro gant ar parañ war c'hoazh."

"Dont a rint da gerc'hat ac'hanoc'h d'ar memes eur."

Mont a reas kuit Lipman. Mont a reas Stalin d'ar mele-zour ha digeriñ a reas e c'henou o lakaat e zent war vel. Ne oa ket ur skeudenn vrad da wetlet : ne chome nemet pemp dant ouzh e javed uhelañ, pemp dant melen, saotret gant ar butun.

Ne velas den d'an deiz-se, lezel a reas an digizidikaat steuziañ. Evel m'ten doa kuzuliet Lipman ne zebras netra e-pad div eurvezh hag evit merenn ne 'z eas gantañ nemet ur banne soubenn kig bevin yen ha bou-loudennou igoù kig damgiour. Ne reas ket poan dezhañ ar gouli ha n'en doa ket ezhomm kemer louzou.

Dont a reas Lipman an deiz war-lerc'h vintin, sellet a reas ouzh an dant ha diskleriañ a reas e oa pijet.

"Mont a ra mat an traoù. Kregiñ a rimp gant ar rastell nevez a-benn daou zvezh."

"Diskutizhañ a rit mat ?" a c'houlennas Stalin. "N'eo ket re hir an amez ?"

"Met, Josef Visarionovitch, penaos e c'hellfed kavet hir an amez gant ar mor, an draezhorn just e-kichen, ha kavet am eus paper da skrivañ ha kreionoù leun war ma saol, setu staget an da skrivañ."

"Petra a skriviñ ?"

"Ul labour arbennigour war ar protzennoù."

"Chañs vat a hetan deoc'h" Lipman a sellas ouzh genou Stalin ha diskleriañ a reas ez ae mat an traoù gant ar gouli ha tu a vefe dezhañ da gregiñ gant e labour war ar rastell nevez a-barzh daou zvezh.

"Ware c'hoazh martez ?" a c'houlennas Stalin.

"N'eo vefe" eme Lipman en ur vouc'hoarzhin "met gwelloc'h vefe gortoz betek an deiz war-lerc'h."

"Ma soñj deoc'h" a respon-

BUGALE ARBAT

Stalin en ur grizañ e dal. "Penaos mañ kont gant al labour ?"

"Ne vo kroget gant al labour nemet pa vo bet graet ar moul."

"Soñjal a raen en ho levr" e zisplegas Stalin doare dezhañ bezañ chifet.

"Digarezit ac'hanon, n'em boa ket heuilhet ar gaoz... Trugarez, labourat a ran warnañ."

Sevel a reas Stalin.

"Kenaoz."

Dont a reas Lipman d'an eur a oa bet lakaet dezhañ ha kregiñ a reas d'ober ar moul koar. Ne bliche ket da Stalin an doare-ober-se ha santout a ra pe oa an dentour o tennañ ar c'hoar ez afe e zent diwezhañ da heul. Ne oa ket gwelloc'h dezhañ santout an tammou koar a oa chomet en e c'henou.

"Pep tra a seblant bezañ mat," eme Lipman a-benn ar fin, "mat-tre eo ar moul, met en em c'houlenn a raen hag eñ ne vefe ket gwelloc'h ur rastell simploc'h a-benn ar fin, Josef Visarionovitch ?"

Skeiñ a reas Stalin ouzh brech' ar gador gant e veilh-dorn. "Laret am eus deoc'h e Ruzineg fraezh em eus c'hoant urvan aour !"

"Ya, ya, evel just," a c'houlennas Lipman buan. "Graet 'ho 'giz peus c'hoant. Prest 'vo war c'hoazh vintin."

Sellet a reas Stalin digrouz, ouzh Lipman o tastum e draoù gant e zaoarn o krenañ. Spontet e oa ar penn-kalet.

Chom a reas a sav da renkañ e draoù a-daol-trumm ha goullenn a reas lentik, Josef Visarionovitch, ret eo din dibab liñ an dent. Tu a vefe deoc'h azezañ en-dro ur pennadig, mar-plij ?"

Stalin a lakaas en dro e benn ouzh an harp-penn ha digereas Lipman meur a standilhonn. Doare a oa dezhañ bezañ chalet rae kemer kalz amzer. Aet e oa ze, e c'henou digor e-pad ken pell.

"Daoust hag eñ emaoz'ho o vont da achuiñ ganti a-barzh pell ?"

"D'ouzhtu", eme Lipman o klask an eil skouerenn war-lerc'h eben. E soñj a reas a-benn ar fin ha laret a reas, "Tu 'zo deoc'h sevel bremañ. Klask a rin bezañ prest war c'hoazh vintin". Feson an ne c'hamant a oa war e zoulagad pa serras e valizenn.

An deiz war-lerc'h vintin e c'houlennas Stalin e vefe kaset an dentour.

"N'ous ket ochu c'hoazh, Kamarad Stalin," a respontas Tov-stukha e sekretour. "Lavaret en deus ne vefe ket prest a-raok war c'hoazh."

Teñvalaat a reas penn Stalin. "Kasit anezhañ amañ."

Degouezhout a reas Lipman ur pennadig war-lerc'h, berr e anal. "Prometet ho poa din ar rastell evit hiziv. Perak n'ho peus ket dalc'het d'ho ker ?" eme Stalin.

"Ne oa ket poubl, Josef Visarionovitch."

"Petra 'zo kaoz eus an dale ?" Teurel a reas Stalin ouzh an dentour ur sell en defe spon-tet forzh piv.

"Ya, ya, evel just," a c'houlennas Lipman buan. "Graet 'ho 'giz peus c'hoant. Prest 'vo war c'hoazh vintin."

Sellet a reas Stalin digrouz, ouzh Lipman o tastum e draoù gant e zaoarn o krenañ. Spontet e oa ar penn-kalet.

Chom a reas a sav da renkañ e draoù a-daol-trumm ha goullenn a reas lentik, Josef Visarionovitch, ret eo din dibab liñ an dent. Tu a vefe deoc'h azezañ en-dro ur pennadig, mar-plij ?"

Stalin a lakaas en dro e benn ouzh an harp-penn ha digereas Lipman meur a standilhonn. Doare a oa dezhañ bezañ chalet rae kemer kalz amzer. Aet e oa ze, e c'henou digor e-pad ken pell.

Ur c'hruz a reas Lipman d'e skouz, doare dezhañ bezañ divarrek d'ober netra.

"Larit din ar wirionez", eme Stalin.

"Ma", a grogas Lipman, abaf. "Ne oa hini ebet eus an dent em boa digaset ganin a zigouezhe gant ho re."

"Perak n'ho peus ket degaset ar re vat ?"

"Degaset 'm eus an holl re a zo ganeomp, ar re diouz ar seurt hon eus implijet ganeoc'h dija, dretat-holl."

"Ha neuze ?"

"Dont an dud a cheñch liñ, dretat-holl pa utunont. An dent am eus kaset ganin a zo tost tre diouz ho re, tost tre gvir eo, met chom a ra un tamm arliv disthevel koulskoude."

"Anat e vefe ?"

"Ne vefe ket, pas koment-se, met un arbennigour a welfe an diforc'h diouzhtu."

"Petra 'ra din-me ar peah a soñj an arbennigourien ?"

"Ne felle ket din e vefe Lavaret en eus moc'het ul labour evidoc'h", a eilgerias Lipman.



Nebeut a skeudennoù 'zo lec'h ma weler an diktatour gant e familh. Al lod brasañ eus an istorourien a gred ne ra ket kalz war dro e vugale. Emañ amañ gant e verc'h Svetlana

BUGALE ARBAT

"Het eo din chom amañ di-
zent abalamour d'ho lorc'h-mi-
cher, neuze", a c'hodias Stalin
"Peget amser ouzhpenn e pado
an dra-se c'hoazh ?"

"Goulnnet 'm eus e vefe
pellgomset da Voskou, evit ma
vefe kaset dent all din. Hoet
'm eus niverennoù ar c'hatalog"

Stalin a baras e zaoulagad
war Lipman, a-ratozh kaer. "Met,
emaoc'h o paouez laret ho peus
kaset ganeoc'h kement tra a oa
ganeoc'h e Moskou."

"Kavet a rint anezho e..."
"E pelec'h ?"

Grozmolat a reas Lipman
hep sevel e zaoulagad, "Berlin".

"Berlin ?"
"Brenet 'm eus anezho di-
war ur c'hatalog alaman."
"Perak n'ho peus ket laret
-se din diouzhtu ?"

Ne respontas ket lipman.

"Difennet eo bet ouzhoc'h
laret din ?" a c'hodias Stalin
adarre.

"Tovstukha e oa ?"

Ober a reas Lipman un hej
penn kazi diheverzus.

"Ho pes soñj eus se" a la-
ras Stalin war un ton rebechus.
"Ar peñs ho peus da lavaret pep
tra d'ar C'hamarad Stalin, ret
eo lavaret pep tra d'ar C'hamar-
rad Stalin, hag arabat kushat
netra digant ar C'hamarad Sta-
lin: un dra all c'hoazh : n'eus
ket tu da gushat tra ebet di-
gant ar C'hamarad Stalin. Abred
pe siveshat e kaoz ar wirionez"

Heg e oa an dale gant ar
rastell met renket e vefe a-
benn ar fin. Kalz nec'husoc'h e
oa e vefe bet rediet an dentour
da liñ gant. Den en-dro de-
zhañ n'en doa an droad da zis-
tagañ an disterañ ger diwir. Ur
ger bihan a zeas atav unan
brasoc'h d'e heul. An holl dud,
adalek izili ar Politburo betek
paotred ar gegin a ranke gou-
zout e oa ret lavaret ar wirio-
nez d'ar C'hamarad Stalin, ar
wirionez en e fezh ha tra ken
'net ar wirionez.

==*==*==*==

Lezel a reas an dentour
mont kuit ha gervel a reas Tov-
stukha.

"Perak ho peus lakaet an
bremañ 18

dentour da droñplañ ac'hanon?"

Dic'hortoz e voe ar res-
pont. "Aon em boa na saufec'h a-
enep prenañ ar rikou e Berlin".

Tovstukha en doa prouet e
oa un den leal. Ne oa ket dleet
dezhañ en em dennañ gant ur ga-
our avat.

"Aoset ho peus pep tra
dec'h hep laret din, eme Stalin
're siveshat eo evit cheñch tra
pe dra bremañ. Met perak ho
peus lakaet an dentour da gon-
trañ din ur gaou ?"

"Aon 'm boa na larfe pep
tra deoc'h ha na versfec'h ouz-
shomp ober se."

Mont ha dont a rae Stalin.
Un dra dister e oa gourc'hemenn
dent e Berlin. Met ar gevier a
ranke bezañ kaset diwar hent
diouzhtu, hag ur wech da vat.

Lakaat a reas Stalin e
benn stok ouzh hini Tovstukha
ha parañ a reas e zaoulagad
warnañ. Ruziñ a reas Tovstukha
hag ur c'hamed a reas war gil.

"Ne fell ket din e vefe
gouzouted ha toullerien en dro
din. Ret eo din bezañ gouset da
gout fizizañ en dud a zo en
dro din, penn da benn ! Arabat
dezh ho liñ gant, noken evit
traoù dister, arabat dezho soñ-
jal en dra-se zoken".

Santet en doa Tovstukha e
oa bet distaget ar gerioù diwe-
zhañ gant Stalin war un ton
komprenusoc'h un disterañ.

"Digarant ac'hanon. Graet
em boa-se hep soñjal".

Met faziet e oa en e var-
nadenn ha Stalin a selle outañ
adarre gant e zaoulagad gour-
drouzus.

"Kastizañ a rin an diste-
rañ gaou kalet tre. Ha seul ka-
letoc'h e vo evit ar e laka
ar c'hoskor da liñ gant. Kompen
a rit 'michañs ?"

"Ya, Kamarad Stalin. Ne
c'hoarveso ket ken."

An deiz war lerc'h e reas
da c'houzout Tovstukha e oa
prest pep tra gant an dentour.

"Lakañ anezhañ da zont",
a c'houlennas Stalin.

Dont a reas Lipman ur mous
-c'hoarzh war e c'hanon evit en
em zigareziñ.



**ANATOLI
MARTCHENKO**
MICHÉROUR LAZHE
E 1986
ER
C'HAMPOU SOVIEDEL
URSS DEMOKRATEL
GORBATCHEV ?

BUGALE ARBAT

Azezañ a reas Stalin er
gador-vrec'h ha lakaat a reas e
benn ouzh ar rastell nevez en ur
werennad dour, hejañ a reas a-
nezh evit he dizourañ ha la-
kaset a reas anezhi en he flas
goustadik, gant evezh. Unan a-
our e oa.

"Pep tra a seblant bezañ
mat", eme Stalin.

En ur vont kuit e c'hou-
lennas Lipman digant Stalin
chom hep tennañ kuit ar rastell
a-raok an deiz war-lerc'h vintin
ha gervel anezhañ ma oa ur
gudenn. Ne voe ket ezhomm a-
benn ar fin ha kontant e oa
Stalin. Pa zeuas Lipman daou
dezhañ, "Emaon en aas gant
ar rastell-mañ. Ne wesk ket en
wesk lec'h ha ne ra ket an diste-
rañ poan. Kredet e vefe e
toug anezhi abaoz pell 'zo
dija." Lipman a c'houlennas gan-
tañ azezañ koulskoude. Tennañ a
reaz ar rastell, sellet a reas
pizh ouzh ar vunsun ha lakaat a
reaz ar rastell en-dro.

"Ya," emezañ "deut eo brav
ganeomp".

"Ha seta," eme Stalin.

"Ha n'ho pou ket c'hoant ober
unan aour."

Dilavar e chome Lipman, hag
en ur dermal un tamm e lavaras.
"Kamarad Stalin evel ma 'a oc'h
piliñ gant na labour e karfen
goulnnet ur c'hras-vat dister
ganeoc'h."

"Ya ?" Stalin a grizas e
dal. Ne blijte ket dezhañ e vefe
savet goulnnoù war-eeun. Ur
prozedur rekis a oa evit
seurt traou. Kenlabourerien a
oa gantañ a ouie penaos sevel
ar goulnnoù, ouzh peseurt re e
vefe asantet hag ouzh peseurt
re ne vefe ket.

Tennañ a reas Lipman ur
pakad diouz e valizenn, dispa-
kañ a reas anezhañ ha diskouez
a reas ur rastell blastik. "Me
garfe e toullfec'h ar rastell-
mañ e-pad un devezh, Kamarad
Stalin. Oulet a reoc'h peseurt
hini eo an hini gwellañ hag o-
ber a reoc'h ho soñjo-unan."

Sevel a reas Stalin e ziv-
doab sklaer e oa souezh. Laret en
zhañ an hini aour, skolet en doa
ouzh brec'h ar gador gant e
bihan kalon aour, hag aet e oa
greiz. Amañ e oa koulskoude, o

terc'hel da vont gant e hent.
Ma, piv 'oar, dleet e oa dezhañ
ober un taol-esea.

"Mat", emezañ war e c'hoar-
rigoù.

Lipman a cheñchas ar ras-
telloù. Ne voe ket pell gant e
dro, evel boas. Mat e oa pep
tra a-hervez. "Galvit ac'hanon
ware'hoazh ha larit din peseurt
hini 'zo gwellañ deoc'h mar-
plij, eme Lipman" an hini wel-
lañ a vo dala'het".

==*==*==*==

An deiz war-lerc'h, a-raok
merenn e voe galvet Lipman gant
Stalin.

"Ober a ran na emurutel-
ladenn, ret eo din anavez e oa
ar gwir ganeoc'h. Ar rastell-
mañ a zo kalz skañvoc'h ha kalz
aesoc'h eo ober ganti. Met tu a
vefe dezhi terriñ, gwel e vefe
deoc'h ober unan ouzhpenn din."

Ur mousc'hoazh bras a zeue
gant Lipman. "Ober a rin dek ma
'peus c'hoant !"

"Ho merenn 'peus bet ?"

"Ya, evel just."

"Ma, ne ra forzh, un tamm
ho po ganin."

Kas a reas Lipman d'ar sal
e-kichen e lec'h ma oa bannou



.Anatoli Rybakov gant e wreg Tanya "danjerioù hag avantu-
rioù a-bep seurt am eus bet em buhez" emezañ "Kompen a
rioù bremañ perak on chomet bev. Ma flamedenn a oa bevañ
evit skrivañ BUGALE ARBAT evel un digoll d'ar re a zo
marvet eno".

gwin ha tannoù boued war an
daol. "N'eus ket sodda na lam-
brig ha ne alian den ebet d'hes
ober. Met evit ar peñs a sell
ouzh ar gwin eo dishevel. Pe-
seurt hini ho peus c'hoant ?".

"N'anavezan ket mat tre ar
merkoù gwin", eme Lipman diaes.

"N'eo ket mat. Ret eo ana-
vezout ar gwin. Daou pe dri
banne a laka an den war e blom
ha ne voue ket ar spered," eme
Stalin. Diskenn a reas gwin e
div werenn vihan, tost diouz
ment gwerennoù likor. "Setomp
pado pell ar rastell ho peus
graet din. Debrt un dra ben-
nak."

Lipman a dapas un tamm ba-
ra gant fourmaj-kig.

"Piliñ gant a rafe deoc'h
diskouezhañ pelloc'h e Socht ?"
a c'houlennas Stalin.

"Brav tre eo amañ met ret
eo din distreiñ d'am labour e
Moskou. Ma n'ho peus ket ezhomm
ac'hanon pelloc'h evel just. E-
mañ na fruitikoù o c'hortoz a-
c'hanon. Kroget em eus da lou-
zaout lod anezho soken. Tervet
'm eus bridjoù ha lamet dent,
asetet int eno, o genou digor o
c'hortoz e teufen en-dro. Penaos
e c'hellfen lezel alaman e-giz-
se ?"

BUGALE ARBAT

"Ar gair 'zo ganeoc'h" eme Stalin. "Pegoulz 'peus c'hoant kemer ar c'harr-nij da sistreñ?"

"An abretañ ar gwellañ. Warc'hoazh 'vefe mat."

Digeriñ a reas Stalin dor ar burev ha gervel a reas Lovstukha. "Henkit an traoù evit ma tistrofe an dentour da Voskow warc'hoazh ha gwelit hag en deus c'hoant un dra bennak all!" un hej a reas d'e benn war-zu ar boutailhadou, "lod eus ar re-mañ da skouer". Mont a reas kuit ur pennadig ha distreiñ a reas gant un tamouezh rezin. "Gouest e voe'h da gas ar re-mañ d'ar gêr ganeoc'h? Ma ne c'hellit ket e voe'h sikouret." Treiñ a reas war-zu Lovstukha. "Henkit an traoù evit ma beufe unan bennak da gerc'hat anezhañ e Moskow da gas anezhañ d'ar gêr. Kenavo Doktor!".

"Un den tre e oa an dentour" a laras Kirov en ur vousec'hoarzhin.

"E hini a oa gwelloc'h hag anavezet en eus se dirazañ. E berr komzoù e oa ar gair gantañ da zerc'hel d'e ginnig. Met pe-rak en deus graet-se? Ken aas all e vije bet dezhañ ober ar pezh 'n doa c'hoant. Nann, dal-c'hat 'n deus gant e hent ha n'en deus ket bet aon d'hen o-

ber. Lakaomp eo ur gwir labourer, uhel al lorc'h-micher ennañ, diouz ar seurt hon eus da lakaet en hon fobl."

Chom a reas a-sav Stalin ur pennadig.

"Graet en deus war ho tro?"

"N'eus ket, gwelet 'm eus anezhañ war an aod."

En em lakaat a reas Stalin da gerc'hat o vont ha dont di-drouz.

"N'ho peus ket bet kavet hir an amser a-benn ar fin."

Merzout a reas Kirov ton boas an drouk'hoant hag an disfiziñs e komzoù Stalin.

"Diad e oa an draezhenn, den o neuiñ, nemadon hag an dentour. Div wech en eus gwelet anezhañ. Doare un den mat a oa gantañ a gav din."

"Ya, kaoneus eo", a eilgerias Stalin disebant.

Diouz an noz, e keit ma oa o sinañ paperioù e lavaras Stalin da Dovstukha, "lakait un den all e plas an dentour Lipman."

He goude ur pennadig e laras, "Pet 'vo tennañ anezhañ diouz Ospital ar C'hrenn-in, met arabat ober droug dezhañ."



GLASNOST HA PERESTROÏKA

SKOL VEUR AN HANV E BRO IWERZHON : evel bep bloaz e kinnig deoc'h Skol-Veur Galway ur staj Gouezleg, eus an 22 a viz Gouere d'an 19 a viz Eost. Bigor eo d'an deraouidi ha d'ar re o deus c'hoant gwellaat anaoudegezh ar yezh. Da gaout titouroù : Seamus O Grady, Administrative Director Summer School - University College-Galway - IWERZHON.

SKRID-TESTENI STUDIOU KELTIFIK : Ur skrid-testeni war an danvezioù keltiek a zo bet savet gant Skol-Veur Galway. Kinniget eo d'ar studieren estren, c'hoant ganto studiañ ar gouezleg ha sevenadur bro-Iwerzhon. Da gaout titouroù : M.Peadar Mac an Iomaire - Director of Spoken Irish - Roinn na Nuas-Ghaelge, Colaiste na hollscoile, Gaillimh, IWERZHON.

GOUELIOU AR SERR-NOZ : evit an 9vet gwech e vo gouelioù ar SERR-NOZ (Tombées de la Nuit) e Roazon adalek an 2 betek an 9 a viz Gouere 1988. Dañsoù, sonerezh, c'hoariya, mojennoù, barzhoniezh, murgodennoù, kanaouennoù hag all... 100 arvest er-maez : ouzhpenn 20 bemdez e 15 lec'h disheñvel. Leurgêr Breujoù Breizh, Ar C'hloastr, straedoù kozh kreizkêr Roazon hag all...

100.000 den bep bloaz o vont da welet, da selout, da bourmen, da zebrin... eus 3e30 goude kreisteiz da darzh an deiz. Da gaout titouroù pellgomz : 99.30.38.01/99.30.54.60 Pe sellit ouz ar minitel 36 15 Kod 6C - skeiñ "nuit".

Kevredigezh DALC'HOMP SONJ a gemenn deoc'h e vo ur staj Istor eus al lun lañ betek ar 6 a viz Eost diwarbenn "Breizh hag an Dispac'h Gall" 1789-1815. Da gaout titouroù pellgomz d'an UPBE 97.02.40.00.


M ar fell deoc'h kavout ur c'henskriver evit en em vaataat war ar Brezhoneg, skrivit da "Skingomz ha Skinwel" - 9 bis straed Sant Visant Paol - 22000 -zout ho oad hag an danvezioù a blij deoc'h ar muiañ (gant un timbr evit ar respont).

D aou staj brezhoneg buan ha buan - buhez-pad - a vo savet gant AR SKOL VREZHONEG 40 ru Republik 29200 BREST.

KANTVLEAD BLEIMOR : e-keñver 100vet deiz-ha-bloaz an ganedigezh "Bleimor" e vo ur staj video-danevell e Enez Groe, eus ar 16 d'ar 24 a viz Gouere 1988. Kinniget eo da 8 stajiad. Graet e vo war-dro gant Jean-Yves LE QUEVELL. Priz ar staj : 1000 lur evit 10 devezh.

Da gaout titouroù : Yannick BARON - Kergouareg - 56400 BREC'H - Pg : 97.24.57.67.

BODADOU LABOUR AN EIL DEREZ



PETRA EO PETRA? PIV EO PIV ?

10 bodad-labour a zo ouz ar stern evit an Eil Derezh Diwan. Tost da 80 kenlabourer a zo enno holl. Koefet eo ar bodadou-labour gant KREIZENN AR GERIAOUIN a zegemer an termenoù nevez.

01-BREZHONEG : bodad renet gant Lukian Kergoat (skolveuriad). Savet ez eus bet un hentenn nevez da studiañ ar yezhadur. Ur sell nevez war yezhadur hor yezh eo, graet evit brezhonegerien yaouank.

Un dastumad a destennoù displeget a zo bet azet ivez. Klotañ a ra an temoù studiet gant ar re a vez gwelet e galleg.

02-SAOZNEG : Bodad renet gant Padrig an Habask (kelenner eil derezh skol brevez). Prederiet

ez eus bet gant an doareoù da vuhezkaat ar c'hentelioù. Dibabet ez eus bet un hentenn ha skoulet e vo darempredoù gant ur skol a dramor. Ar matematik eo an danvez a c'hallfe bezañ kelennet dre ar saozneg goude un nebeut bloavezhioù.

03-GALLEG : Bodad renet gant Mark ar Briz (kelenner eil derezh skol Stad). War an dachenn-mañ n'eo ket an dafar pedagogel dastumet ez eus bet un teskad a zielloù a c'hallfe bezañ implijet. Roll labour an danvez-mañ a vo da lakaat da glotañ gant hini ar Brezhoneg.

04-ISTOR HA GEOGRAFIEZH : Bodad renet gant Per an Drezenn (kelennet eil derezh skol stad). Kelennet e vo an danvez-mañ e Brezhoneg war-bouez an "deska-durezh keodedel" a vo graet e

galleg. N'eo ket treiñ kenteelioù e galleg a zo bet graet met savet ez eus bet danvez aratozh. Aet eur dreist d'ar program ofisiel evit kement-tra a denn d'hor bro. N'eo ket bet lakaet studi ar Gelted da stad-gadenn da gentel ar Romaned, da skouer, met lakaet eo bet da gentel a-live gant ar re all ha studiet dre ar munud.

05-MATEMATIK : Bodad renet gant Yvon Gac (kelenner eil derezh skol Stad). Labourer ez eus bet war geriaoueg an danvez-mañ. Da c'hortoz ken na vo peursavet ar c'heriaoueg-mañ e vo graet ul lodenn eus an danvez-mañ e galleg. Diwezhatoc'h e c'hallfe ar saozneg bezañ implijet ivez.

06-FIZIK HA TEKNOLOGIEZH : Bodad renet gant Y-Ber Montréer (ijnour war ar Fizik). Termenet eo bet geriaoueg ar Fizik ha savet ez eus bet Kentelioù diwar dornlevrioù gallek. Ar re-mañ a c'hallfe bezañ implijet evel m'emaint evit harpañ ar c'hentelioù a vo graet e Brezhoneg. E galleg e vo graet an deknologiezh.

07-SKIANTOU AN NATUR : Bodad renet gant Erwan ar Gall (teknikour war ar viologiezh). Deuet eur a-benn eus geriaoueg ar skiantoù naturel. Gant se e vo kinniget d'ar skolidi un dorn levr gallek a vo bet peget testennoù brezhonek war an displegadennoù a zo ennañ.

08-SPORTOU : Bodad renet gant Gilbert Geoffroy (skolaer skol diwyezhek Stad). N'eo ket evit an danvez-mañ eo bet an aesañ geriaouñ daoust d'ar pezh a c'haller soñjal. Deuet eo ar sportoù da vezañ ul lodenn eus buhez pemdez an dud met geriaoueg vodern ar vuhez pemdez n'eo ket an aesañ da sevel daoust m'eo hounezh an hini a zo tremen poent ober war he zro.

09-ARZOU : Bodad renet gant Daniel an Doujet (skolaer Diwan Klasket e vo lakaat ar skolidi da dañva eus meur a soubenn :


treserezh, kan ha son, c'hoari-pezh hag all... en ur denañ implij diouz barrgezh meur a gelenner. Klasket e vo ivez stummañ skiant barn ar vugale.

10-INFORMATIK : Bodad renet gant Fanch Dugast (ijnour informatikour). Klask a ray ar bodad-mañ gwelet peseurt skoazell a c'hallfe ar gelennerien tennañ diouz an informatik evit liesaat o doareoù-kelenn.

00-KREIZENN AR GERIAOUIN : renet gant Lukian Kergoat. D'ar greizenn-mañ eo da normalizañ ar c'heriaoueg. Tachenn dre zachenn e tiazep pep bodad labour ar roll gerioù teknikel a vo da vezañ implijet evit kelenn an danvez skol e Brezhoneg. Keskrivererzh e vez da c'houde e-tre holl ganlabourerien an Eil Derezh evit burutellañ an danvez geriaoueg. Da "Greizenn ar Geriaouin" eo da zivezhañ da gemer ar stumma a vo kavet ar gwel-lañ ha da lakaat an eil c'heriaoueg da glotañ gant eben.

Ouzhpenn 5000 termen skiantel a zo bet pletet ganto d'an deiz a hiriv. Embannet e vo ar geriaoueg-ou-mañ dizale.

Lukian Kergoat.



BURED DEREZET STAG OUZH HE SKOR HA BECHER DEREZET

Lizhiri.....	2
C'hoari war Minitel..	2
Skolaj Diwan.....	3
Skolaj Diwan.....	4-5
Votadeg.....	6-7
Kanaked e Kemper.....	8-9
Klasoù divyezhek Stad	10
Taolioù Pluenn.....	11
Sinema e Douarnenez..	12
Niveridigezh 1989.....	12
S.A.B.....	13
Keleier ar prozeziou..	13
Bugale Arbat.....	14
Bugale Arbat.....	15
16.17.18.19.20.....	16
Kemennadennoù.....	20
Bodadoù labour Diwan.	21
Romantou brezhonek...	22
Romantou brezhonek...	23
Taolenn bremañ.....	24
Gouel ar Bigi.....	24
Stajoù AN OALED.....	25
Amzer vak e Breizh...	26
Sonerezh TRI YANN....	28
Brezhoneg ha Japaneg..	29
Gerioù kroaz ar miz..	29
MESK-DIVESK.....	30

Ar pennadoù gant Lukian Kergoat, T.L., M.K., Y. Leskildri, Paol ar Meur, APEEB, A.Keravel, S.A.B. Herve Maheo, Y.P., An Oaled, A.V.Chapalain, Daniel ar Gevel, Mikael Madeg, Kioyshi Hara, Dominig Jolivet, Garan ar Meur, YF Jacq.

Ar maketenn gant Nolwenn Louarn, Jil Killevere, Rens Gastinger, Lena Louarn.

Tresadennoù gant E.K. ha M.Baudu, Ar Floc'h 88.

Luc'hskeudennoù gant Michel Bescond, Lena Louarn Yves Mervin, OF, T.L., A.V.Chapalain.

Rener ar gazetenn M. BAUDU

Moulet e ti OSCAR -ROAZON 99.30.16.49.

Koumanant bloaz 120 lur.

BREMAN 8, straed Hoche, 35000 ROAZON 99.38.75.83

bremañ 24

DOUARNENEZ GOUEL

E bro Gerne, eus Konk-Kernev da Gastellin, eus Rostren da Zouarnenez ne vez kaoz nemet eus ar gouelioù anvet DOUARNENEZ 1988. Gouzout a rit dija tamm pe damm petra 'vo ar gouel-se. Michel Bescond en deus bet ar vadelezh da respont evidomp ouzh un nebeut goulennoù.

Bremañ : E 1986 ho peus azost ur gouel bras d'ar benn ar bigi, 2 vloaz goude e krogit en-dro. Perak ober-se en dro ?

M Bescond : 2 vloaz a zo hir. Traoù a zo bet graet e-kerz ar prantad-se. Ur vag ravaranelañ st Jakut, ha re all evel ar "Boisquine" e Konkaven. Ul lañs nevez a zo gant ar bigi kozh. Ha dav eo deomp bezañ test eus kement-se. Ne vo ket ar gouel-mañ heñvel ouzh hini 1986.

Bremañ : Ha petra 'vo graet goude ? Daoust hag ef 'zo tu deoc'h kreskiñ e'hoazh hag ober brasoc'h e 1990 ?

M Bescond : Graet 'vo ar gouel ar bloaz-mañ ha goude-se e vo gwelet. Evit ar mare eus dija 500 bag enskrivet hag e vo tizhet 600 d'an soñj. Laret bremañ e vo ur gouel e miz Eost 90 a vefe sot. Met bez e c'hellomp laret, e c'hontrol, e vimp prest da gemer perzh, e kement gouel o tennañ d'ar mor hag o tremen e Breizh, pe, gwelloc'h c'hoazh, e Douarnenez.

Bremañ : Peseurt plas a chom d'ar bagoù kozh, an deiz hiriv.

KAMP ETRKELTIK AR VREZHONERJEN

20-30 A VIZ GOURE 1988

A ozet vo kentelioù KEMBRAEG e-pad ar c'hamp hevlene (etre ar merv'her 20 -noz-hag an 30 a viz gouere, e Skaer e skol Sant Alan). Daoust d'ar brezhoneg bezañ yezh ar staj e-keñver darempredoù hag e-keñver studi, e vo tu d'an dud enskrivet heuliañ kentelioù kembraeg hervez o live.

Diouzh un tu all e vo degemeret Kembreiz er c'hamp evit deskiñ brezhoneg. Kement ha gouzout hiroc'h diwar-benn ar c'hentelioù kembraeg hag ar staj e-unan, skrivit d'ar chomlec'h-mañ :
K.E.A.V. 44 straed Jean Rameau
29000 KEMPER

N'eo ket achu gante pa gavont bod en ur mirdi ?

M Bescond : Ne vez ket savet ur mirdi an deiz a hiriv e-giz ma veze graet gwechall. Evidomp ez eus daou dra disheñvel a ranker merzout. Dastum a reomp bigi kozh evit bezañ diskouezet. Evit ma c'hellfe an dud kompren pe-naos int bet savet ha pe-naos e veze graet ganto. Seurt traoù e deus kement kalz a-hed ar c'hantvedoù ha studiañ seurt kemmañ a zo a-bouez bras evit kompren ar bed d'ar mare-se, hag evit kompren doareoù labour an dud.

Met ur mirdi gouestlet d'ar bigi a c'hell mont pelloc'h. Bez e c'hell sevel bagoù diwar raktresoù a-wechall ha degemer morerien a hiziv evit reiñ dezho santadurioù nevez, o lakaat anezho da verzout en un doare gwirion petra 'oa ar vuhez war ar bagou-se.

Bremañ : Met perak klask kaout ur vag koad ?

M Bescond : Perak ? Perak kaout legumaj en ul liorzh pa c'heller kaout anezho marc'had mat-tre en ur gourdarc'had ? Perak e fell da lod bale war droad pe war varc'h ?

Bez 'zo tud o klask warlerc'h gwir blijadurioù, nerzhus, hoalus. Aze n'eus ket a vekanikoù (winchoù hag all). Aze eo dav da bep hini en em den-nañ, kaout bec'h, ha dent a-benn...

AN DUCHENN HUD BECHEFEL



KAFEDI-TI KRAMPOUZEZH abadennoù-noz A-BEP SEURT

Etra ROAZHON ha DINAN (ul lec'h
piñus, degemer e brezhoneg, da 25
mn eus Roazhon !!!!)

AR BIGI



DA WELET E DOUARNENEZ

■ An Atlantic Challenge : redadegoù war vagoù "yol Bantry" (XVIIIvet kantved, 11,6 hilder, 10 roeñver) etre 4 bag kaset war-raok gant Bretoned, Gallaoued, Iverzhoniz, Amerikaned ha Daned.

■ Ar bagoù brasañ (4 gwern) ar Belem (deut e 1986 dija) hag ivez Spirit of Merseyside (Liverpool GB) hag all... (600 all).

■ 3000 martolod, 250 saver maketennoù, 150 stal, 150 muzisian.

■ 4 devezh filmoù (l'homme d'Aran gant Haberty hag ur bern re all) en ur sal 600 plas war ar porzh.

■ Ar porzh hag ar bagoù sklerijennet deus an noz gant Yann Ker Sale (labouret en deus gant Higelin, e beg an Dorchenn, er "Grand Palais" e Pariz...

ROLL AN ABADENNOU

10-11 A VIZ EOST degemer ar bigi hag ar skipailhoù e Porz Meur hag e Porz Ruz.

12 a viz EOST troioù e bae Douarnenez. "Moreadenn diskouez" girak ar porzh da 4 eur goude merenn. Koan ar skipailhoù.

13 A VIZ EOST Redadegoù evit an holl rummadoù bigi.

14 A VIZ EOST kenstrivadeg teknikel evit ar bagoù dre lien, ha redadegoù bagoù dre lien dre roeñvañ.

15 A VIZ EOST Redadegoù evit an holl rummadoù -Reñ ar prizioù

Nebeut tre a dud o deus ur vag koad (1-2 %). Ar re-se a glask santadurioù disheñvel. Ne vint morse niverusoc'h evit ar re all. Mat eo. E-keñver priz e troc'ho atav an hini blastik (e -tousez ar bigi touristañ). Evit ar pezh a sell ouzh ar bagoù peskerezh e Breizh (2054 bag) ez a ar brasañ niver (72 %) gant ar bagoù-koad (evit ar pezh a sell ouzh bagoù dindan 18.20m). Ha vez afer ouzh bigi brasoc'h e vezont graet gant houarn.

Bremañ : Petra en deus degaset ar Chasse-Maree da Zouarnenez ha da vro-Gernev dre vras ?

M Bescond : 7 vloaz 'zo e oa 4 den 'o Tabourat. Bremañ ez eus 30. Ha da heul ar Chasse-Maree eo deut AR MEN, an FRCM, Mirdi ar bagoù, ar chanter sevel bagoù. Da laret eo war-dro 50 den. Lakaomp e lakfe 300 den o vevañ ha muioc'h marteze. Da skouer ez omp ni gwellañ praktik e ti-post Douarnenez pehini en deus kresket abaoe emomp aze. Hag en deus cheñchet rann e-keñver melestradurezh ar P.T.T. Dastumet gant Yann Fanch Jacq.



STAJOU

KELEIER

nevez 'zo gant danvezioù nevez war batrom bigi grilheta Breizh gwechall. Div vag all giz nevez a gemero perzh ivez moarvat er veaj. Tro o do evel-se ar berzhidi da ober anaoudegezh gant meur a zoare bageal.

Eus an Aber Benaet e savo al listri o eor evit skeiñ war z Enez-Sun ha da Sant-Pabu eo e tistroint ivez ur wech echu o zroiad.

Penzek stajiad a vo degemeret d'ar muiñ evit ar veaj ha diskleriet e vint evel "Trei-zhidi war ur vag-dudi". Dav e vo dezho evel just kemer perzh e buhez pemeziek ar strollad (sikour evit alleviatañ, fardañ boued, kannañ...). Kentelioù ha kaozeadennoù war ar verdeadurezh ha brezhoneg ar mor a vo ivez e-pad an amzer vak.

Ne gousto nemet 600 lur ar staj evit ar frejioù aozañ, ar frejioù boued, gas oil ha porzh o vezañ ranmet war-lerc'h etre ar berzhidi (kontañ war-dro 500 lur). 16 d'ar 24 a viz Gouere 1988

KAMP ETRVROADEL AR RE YAOUANK MINORÉLEZHIOU EUROPA

Tro Breizh eo da zegemer an hañv-mañ kamp etrevroadel ar re yaouank a vez aozet bep bloaz en ur vro eus Europa, ganti ur yezh hag ur sevenadur dezhi hec'h unan na vez ket implijet kalz er vuhez foran.

Dalc'het e vo ar staj e kreizenn sevenadurel vreizhek AN OALED e Treglonou (Bro-Leon) Digor eo d'an holl dud yaouank e Europa (adajek 18 vloaz) a zo dedennet gant an danvez-studi bet dibabet e 1988 : "Ar re yaouank, an dud ha sevenadur ar broioù bihan".

War an dachenn-se eo e vo labourer bep mintin dre strolladoù. Klasket e vo dielfennañ stad an traoù e pep bro d'ar mare-mañ hag en em soñjal war ar politikerezh a vefe mat lakaet e pleustr evit an dazont.

Goude merenn e vo lakaet hor mignoned eus ar broioù all

da zizolioñ Breizh ar pezh a vo un doare evidomp ivez da ober anaoudegezh ganto.

Pourmenadennoù bras a zo war ar roll (Enez-Eusa, Park an Arvorig, Gouel an Oriant) ha tro-dro da d/Treglonou e vo tu deomp gweladenñ bro an Aberioù en ur ober sport (marc'hegañ, bageal, mont war gamoel). Abadennoù ha beilhadegoù a vo eveljust diouzh an noz. Deus ar tañ betek an 10 a viz Eost 1988

KAMP HANV EVIT AR GRENNARDED

Ur c'hamp foeta-bro war velo eo a vez kinniget d'ar grennarded ar bloaz-mañ gant AN OALED eus an 2 betek ar 16 a viz Eost.

Evit kemer perzh ennañ eo ret bezañ etre 12 ha 15 vloaz ha gouzout awalc'h a vrezhoneg evit bezañ gouest d'ober gantañ e buhez pemeziek ar strollad.

Oberiantioù en diaveaz eo a vo kinniget dreist-holl hag e vo klasket ivez dizoleiñ Kreiz-Breiz dre ergerzhadennoù, troioù-bale, pourmenadennoù.

Pal ar c'hamp a zo anavezout gwelloc'h al lodenn-se eus Breizh ha klask gouzout petra 'ra eo disheñvel (an tisavourezh, ar maezioù, ar yezh...).

Dalc'het e vo lod brasañ ar c'hamp e diabarzh Park an Arvorig. Eus Komanna, lec'h ma vo ar c'hamp-kreiz, e beajo ar strollad gant belioù ; dre se eo ret d'ar berzhidi degas pep a velo. Ur velo a ranko digouezhout mat gant an implij a vo ha bezañ a-ratre evel just !

Priz ar c'hamp a zo 2000 lur en holl. 12 perzhiaid a vo degemeret.

Evit kaout muioc'h a zisklariadurioù n'ho peus ken skrivañ pe bellgouz da : AN OALED - Treglonou - 29214 LANNILIZ 98.04.07.04.

AMZER VAK

DIZOLEIN BREIZH E-PAD AR VAKANSOU



Stu amañ da heul un nebeut kinnigoù evidoc'h da weladenñ diskouezadegoù, da gemer perzh e Gouelioù a-bep seurt savet e Breizh e-kerzh an Hañv 1988.

Taolennoù Eugène Boudin e Mir-dl an Arzou Kaer e KEMPER, plasenn sant Kaourintin adalek ar 24 a viz Even betek ar 26 a viz Gwengolo.

Eugène Boudin (1824-1898) a zeuas da Vreizh ur wech ar bloaz e-pad toud e vuhez. Tre-sadennoù eus Brest, an Elorn, livadurioù Binig, Pempoull, ar C'hroazig, Beg ar Raz, Pont Aven, Kemper, Douarnenez. Livet en deus 4000 taolenn 10 % e Breizh hep kontañ 600 tresadenn.

E Kemper ez eus 37 livadur ha kemendall a livadurioù dre zour, gant danvez Kernev. Bemdez 9.30-12, 2e-6e30 noz nemet d'ar Meurzh.

Abati DAOULAS "Araok ar Gelled... Europa" : dedennus eo gweladenñ an Abati hag ouzhpenn ul lec'h kaer ez eus diskouezadegoù bep bloaz. Er bloaz-mañ e vez digor bemdez adalek ar 14 a viz Mae betek an 31 a viz Eost.

An diskouezadeg etrevroadel a ziskouez penaos da vare an houarn ez eo aet war-raok ar sevenadur. 60 mirdi en Europa o deus kenlabouret evit dont a-benn da ziskouez :bravigoù eus

bro-spagn, armoù Bonn, tokoù houarn Vikse (Danmark). Adsavet eo bet e park an Abati tiez ar mare-hont.

Mirdi Breizh e Kemper "Eus ar c'hraou d'ar c'hriñgol" : tu vo da weladenñ amañ teir diskouezadeg : 1- orin hag istor mirdi Breizh, 2- dindan askell peseurt sant mont ? : perak ez eus delwennoù er mirdi, penaos int erret aze, 3- "Eus ar c'hraou d'ar c'hriñgol" : istor ur vro, an dud gant traoù dibabet hag a zisleg buhez an dud e gwirionez.

Erwan le Bris, Du Rest, Rener ar mirdi a zisleg "Klask a reomp reiñ ur roll nevez d'ar mirdi, ar pal n'eo ket hepken diskouez "traoù brav", met stagañ anezho da vuhez an dud en o endro. Ur skouer : en ur sal ez eus an istor a-tremañ gant "naketenn EDF Centrale Plogoff" skriteleoù, penadegoù hag all... penadegoù evit ar re yaouank war c'hoas da gompren ar stourmoù bet renet er vro !"

TREVAREZ a-bep seurt diskouezadegoù e kerzh an hañv : livadurioù "Ar Skouezeg" ha meur a dra all, ar skrivagnerien e Breizh...

Pourmenadennoù war droad a-dreuz ar vro : da Tibab zo - pourmenadennoù 1 eur pe ziv, reoù hiroc'h un tamm met nebeutoc'h eget un devezh hag pourmenadennoù bras ouzhpenn un devezh.

Meur a aozadur a ginnig mont da vale : AN ABR1 hag a werzh ivez tiez-degmer, ouzhpenn 120 e Breizh. Titouroù o pellgomz : 99.31.50.44.

AN SEPNB a ginnig ivez pourmenadennoù evit dizoleiñ loened ar vro.

AN ULAMIR en deus embannet evit 1988 ul levrig 40 bajenn o kinnig ur valeaden da nebeutañ er 17 kumun Bro Gemper. Lod all zo bet embannet arak evit Bro Leon : Gwitalmeze, tro dro da Vrest, kanton Lokouran...

1600 koublad laboused a zeu da reiñ bep bloaz er "C'hap Sizun" pourmenadennoù ha degemer eus ar 15 a viz Meurzh d'an 31 a viz Eost. Titouroù 98.70.13.53. Goulien - 29113 Gwaien-Goulienn Erig Thoumelin.

Festival Kastilli ha manerioù Kanaouennoù, sonerezh, pourmenadennoù a dreuz bravañ kastilli ha manerioù ar vro. PLEIBEN tro-dro d'an 11iz (a viz Gouere) Laz-seniñ Pleiben da 9 e. noz, "War varc'h d'ar Mor" da 9e30, ha da 10e30 "An Triskell" renet gant R. Abjean. KARANTEG kastell ar Front 12 a viz Gouere, 9e30 noz "Meurzh Aod ar Mojennoù" sonerezh, kanaouennoù, Dañsoù, renet gant M. MARZIN gant ar soner Per Tallec. KAREZ Kastell Ruz - 15 a viz Gouere-8e da hanternoz : Kelenñ keltiek AHES, laz-kanañ GREIGIAU (bro Gembre), strollad bugale opera PEKIN (China).

SANT FREGAN, Kastell Penmarc'h, 15/16 a viz Gouere : savet e 1540 ar c'haostell-se zo unan eus ar re vrasañ e Bro Gagan. Da 9 eur noz : Marion an Dispac'h gant Compagnie des Abers savet gant B.Lotti.


BREST Maner Keroual 16 a viz Gouere : da 9 eur noz Cantorion Greigiau renet gant Mair Roberts (Bro Gembre).

KLEDER Kastell Tronjoli d'ar 17 a viz Gouere, da 9 eur laziou-kanañ Bro Leon renet gant Roger Abjean. Da 10 eur dañsoù strollad broadel Bulgaria.

LANDERNE 23 a viz Gouere e Maner Kerand, da 9 eur Laz-kanañ Gabriel Faure ha da 10 e. Kelenñ Keltiek Avel a Benn Pempoull.

DUDI SONEREZH AL LESTR MAEN

DANIEL AR GEVEL



Degemeret e vo an dud (ar selaouerien) gant ur marc'hadour a ginnig war follennou-nij kontadenn ur "werz boemus savet a-nevez diwar-sujet "darvoud gwirion "Al Lestr Maen" ".

Ar ganerien hag ar sonerien a grog gant gwerzioù ha sonioù, an darvoudoù bet bevet gant tud Trehoet.

Korollerien, margodennoù ramzel, ur bagad, ul laz-kanañ a c'hoario roll harozed an Istor en ur c'hinkladur a zo bed ar bann treset, bannet war ur skramm bras.

AR BLADENN LAZER

Bez ez eus e oberenn AN TRI YANN 24 ton ha son : e galleg, e brezhoneg, e saozneg, e latin hag e kreoleg. Krouet eo bet ar sonerezh gant an TRI YANN evel just. Gilles SERVAT en deus skrivet ar c'hanaouennoù brezhonek, Rene ABJEAN a zo penn al laz-kanañ, Pierre Claude ARTUS a zo penn-soner...

C'hoariet eo bet e Roazon (e-pad abadennoù Serr-Notz), hag e Naoned dija met tu zo deoc'h gwelet an abadennoù c'hoazh e... KEMPER d'an 21 a viz Gouere EN ORIENT d'an 09 a viz Eost E PARIS d'an 16 a viz Du.

Tu vo deoc'h gwelet e Gouelioù Bras an Hañv un abadennoù sonerezh gant ar strollad TRI YANN bet savet diwar bann treset Christin ha Bilal "AL LESTR MAEN" (le vaisseau de Pierre).

AN IKTOR

Trehoet, ur geriadenn pesketerien, en em gav preizh marc'hadourien tiez-vakañsoù. Anv zo da dreiñ anezhi en ur geoded vakañsoù war an aod.

Sellout a ra tud Trehoet ouzh ar chanter hep ober netra

er penn kentañ. Mont a reont kuit a-benn ar fin en ur gas o c'heriadenn hag he c'hastell kozh d'an tu all, d'ar bed, d'ar bed e-lec'h ma vo adsavet Trehoet.

Skoazellet int gant tud "An Hini Kozh", a zo o chom er c'hastell. Buhez a ro en dro d'an holl re o doa bevet er bar-rez abaoe an deroù.

Hag int war vor da heul ar c'hastell kozh...

OBERENN TRI YANN

WAR AL LEURENN



BREIZH E BRO JAPAN



Nañs

Keneiled ker,

Kas a ran un nebeud ke-
leter deus Japan. Da gentañ 'm
eus embannet nevez 'zo un droidigezh japanek diwar-benn yezhoù bihanaet Bro-C'hall. Anvet: Shitagerareta Gengo no Fukken (Añtalvoudekadur ar yezhoù bihanaet). Al levr orin a oa bet graet gant an Aotrou H.Giordan (Par les langues de France, Centre Pompidou, 1984). Stad a-vremañ ar gelednadedezh evit pep yezh a zo displeget gant an hini a gelell. Ar brezhoneg a vez gwelet da gentañ, ha goude an alzaseg, an okitaneg, hag all, hag evit echuiñ e c'heller klevout lavaret ar yezhoù oil, dreist-holl ar galoeg.

A-hend-all zo bet 10vet Bodadeg ar Geltiegourien e Ja-

pan d'ar lañ ha d'an 2 a viz Ebril 1988 e Nagoya. Me 'm eus graet un danevell : Stad a-vremañ ar brezhoneg, hag ar studadennoù diwar e benn. Da geñver ar vodadeg-se 'm eus kaset ur pennad d'Al Liamm.

E Tokyo emañ Kevredigezh ar Gembraegerien (un dek bennak a dud deus Bro-Geobre o labourat e Tokyo) hag ober a reont bep bloaz Gouel Sant David. Evit an Euskareg ez eus ur c'helc'h-studi e Tokyo (dre ma 'n eus nebeud a izili). Met evit ar pezh a sell ouzh ar Brezhoneg n'eus netra betek-hen. Tud 'zo hag a studi Breizh ha graet eo vo un dra bennak.

Ken ar wech all,

Kiyoshi Hara (Tokyo)

田中克彦氏 [すいせん]

フランスには、フランス語に劣らず、魅力的で個性的な言語がいくつも話されている。だが、それらが生き続けるためには苦難のたぐいがあつた。本書はこうした小さな言語の詳細をはじめて描き出した。すぐれた総覧であるとともに、小言語でもいかに大言語に抗して身を守ることができるかを示した実践の書でもある。

RESPONT GERIOU KROAZ MIZ MAE 88

1	H	E	O	L	G	L	A	V
2	A	R	N	E	V	E	M	E
3	D	E	N	I	R	V	I	N
4	A	M	A	E	O			
5	N	O	Z	O	D	E	D	
6	A	R	U	V	M			
7	A	N	E	V	A	L	T	E
8	V	T		O	P	A	L	
9	E	Y	N	T	A	R	N	
10	L	I	A	I	R	I	N	

GERIOU KROAZ MIZ EVEN HA GOURE

1								
2								
3								
4								
5								
6								
7								

A-LED

- 1- BORD AR MOR - WAR AR MOR E VE-ZONT GWELET, PEURLIESAN.
- 2- E BRO-LEON ZO DEUSOUTE - DIV C'HOAR.
- 3- BRUDET E VEZ AR VARTOLODED E-VIT BEZAN.
- 4- PROF - YA KERNEV IZEL.
- 5- ENEZ.
- 6- EUS BEZAN - EUS BEZAN, C'HOAZH - ANV PLAC'H.
- 7- GER-MELL - LIZHERENN GENTAÑ HO KELAOUENN - BERRADUR.

A-SERZH

- I - GWENTOU -
- II - N'EO NET DINDAN -
- III - PA VEZ IZEL AR MOR -
- IV - AR PEZH 'RA MESTR AR VRO -
- V - SOT - EUS BEZAN, ATAV -
- VI - KER OKITANIA, EN TU RENEB -
- VII - KAS A RA AR STEB D'AR MOR -
- VIII - RIBL - ANV PAOTR -
- IX - KLEVET WAR VORD AR BAGOÙL BREZEL - ARAOGENN -

2010

STAJOU WAR AN URZHIATAEREZH

35000 Roazon - Da gaout titouroù skrivet da : OSCAR X2000 Pôle Central - 6 bali ar re Unanet-35043 Roazon Cedex - pell : 99-35.11.11.

MESK DIVESK

Prenañ a rit marc'hadourezh er staliou bras c'hwil ivez evel just, a bep seurt pakadoù a zeu ganeoc'h d'ar gêr eus ho karr-tan pe war ho marc'h-houarn. Ha merzet ho peus evel don e vez muioc'h-mui a bakadoù goloet gant ur seurt danvez treuzwelus heñvel ouzh ar plastik ha stumm ar paper gantañ memestra. An danvez-se a gaver koulz evit ur pakad toazennoù hag war ur pakad Malboro.

Ar paperouigoù-se a zo unan eus fallakrañ gwalleur ar bed nevez : ne c'heller ket o regañ pe jogañ ; kaer a vez ober, ne zeuer ket a-benn da zistouvañ ar pakadoù na da'en em zizober eus an danvez er pod lastez goude-se. N'eo ket souezhus e vefe lonket louzeierspered a vil-vern gant an dud pa ziskouez outo kement a goaperezh ha kasoni an disterañ pakad boued pe butun. ■

Ma brenit unan eus ar marc'hadourezhioù-mañ : Kro-nenbourg, Kanterbrau, Evian, Badoit, Mahou, Danone, Gervais, Frigécrème, La Pie qui Chante, Panzani, Gallia, Amora, Vandamme, Maille, Bledina ha Liebig, e prenit madoù bet kenderc'het gant an embregerezh B.S.N., kentañ strollad a Vro-C'hall evit ar boued, hag e roit hoskodenn d'ar 25 miliard a lurioù nevez a vez embreget gantañ bep bloaz. ■

Ouest-France d'an 11-12 a viz Even 88 : ar pennad-stur gant ar rener : F.R. HUTIN : Ar votadegoù a zo un digarez da zibab an dud e-karg barrek da zirouestlañ kudennoù brasañ an deiz a-hiriv : *an dilabour, kresk an armerzh, al labour-douar, arc'hant ar retredoù hag ar c'hedskor (Secu), an Europ, emdroadur broioù ar Sav-Heol. Sed aze ar pezh a zlefe tennañ hon evezh ; sed aze abegoù da votiñ ha da zibab*". War ar memes pajenn gantañ : "Diskenn a ra goustadik ar saotrader war al Liger. Ker Tours pellaet diouzh ur walennad". Ao. HUTIN : biskoazh kement-(d)all. ■

Paotred a-vicher pe deskidi a vez graet anezho. Gant an artizanet hag an embregerezhioù e vezont implijet azalek 15 pe 16 vloaz, en ur heuliañ un nebeut kentelioù.

Pet anezho a zesk ur vicher e gwirionez ? Abaoe miz Genver 88 eo bet resisaet o c'hopr : 15 % eus ar SMIC er c'hwec'h miz kentañ ; 60 % e-pad ar C'hwec'h miz diwezhañ. N'eus ket da glemm.

Piramidenn Ieoh-Ming PEI emeur o sevel goustadik el Louvre e Paris. Priz al lodenn gentañ : 2 viliard a lurioù. Pet deskard a vefe bet tu da baeañ ur bloavezhad kement hag ar SMIC ? Jedit. ■

Ha klevet ho peus e oa marvet tad Le Penn e AUSCHWITZ... Ya, en ur gouezhañ diouzh un tour-ged". Ar bourd a zo bet embannet gant Juquin en e levr "Fraternellement libre". Fent ebet gant la Tête avat, en deus kaset ar stalinour kozh dirak al lezvarn. Hervez ar varnerien e chom ar gwir da fentigellañ ha da vourdañ er Republik, memestra ! ■

Nebeutoc'h a vugale er vro -koshaat a ra ar boblañs-poent eo stourm ouzh diskar Kornog ar Bed. An tonioù-se a vez klevet re alies gant pennoù-bras an tu dehou : Debre, Chaunu, Le Penn...

Ar memes rummad tud a vez a-du krenn gant ar gremm nukleel. Diouzh klevet anezho e rank

-fe an holl vroioù sevel kreizzennoù nevez a-leizh.

Ha koulskoude eo bet prouet ez-skiantel n'eo ket an tredan evit broudañ ar priedoù da c'hoari daou. Un troc'h tredan bras a c'hoarvezas un nebeut bloavezhioù 'zo e New-York ha nav viz war-lerc'h e oa leun chouk an tiez-gwilioùdiñ. An doare gwellañ da adwelet familioù bras er vro a vefe serriñ ar c'hreizennoù nukleel ha troc'hañ an tredan e pep lec'h bep eil abardaevez. ■

Hepdomp-ni, ne vije morzhedoc'h ebet, eme OLIDA. Hepdomp, ne vije beaj ebet, eme ar varc'hadourien-touristelezh. Hepdon, ne vije gwerzh ebet, eme ar bruderezh. Hepdomp, ne vije armerzh ebet, eme an embregerezhioù. Hepdomp, ne vije tredan ebet, eme an nukleerien. Hepdomp, ne vije yec'hed ebet, eme ar vezeged. Hepdomp, ne vije moral ebet, eme ar gatoliked. Hepdomp, ne vije urzh ebet, eme an archerien. Hepdomp ne vije peoc'h ebet, eme ar soudarded. Hepdomp, ne vije deskadurezh ebet, eme ar skolaerien. Hepdon, ne vije justis ebet, eme ar Stad. Hepdomp ne vije stourm ebet, eme an emsaverien. HEPDOMP, NE VIJE KORF BREIN EBET, EME AR PRENVED!

GARAN AR MEUR

